

Maria Prat (1906-2006). Barzonegou

Brezoneg Berlewane a veze implijet gand Maria Prat. Miret ez eus bet eun nebeud traou euz ar brezoneg-se. Dre vraz eo bet adlakaet he brezoneg hervez ar stumm “lennegel“, dreist-oll *-it* e-leh *-et* evid an eil gour liez euz ar verbou, evid na vefe ket heñvel ouz an ano-gwan-verb.

Ober a ra gand “zo“ e leh “ez eus“ hag a-wechou gand geriou galleg brezonekaet.

Lakeet ‘z eus bet ousoenn barzonegou na oant ket e-barz ar skrid kenta.

Taolenn

O ! Brezoneg
En-tal ar groaz
Iliz Berlewane
Kaerder ma bro-Lannuon
Ar bara gwenn
Deom d’ober eur bale
Ar grampouezerez
An azen
Bro e gavell
An trouz
Ma zoñjou e Traou-an-Dour
An deiz kentañ a viz Mae
Ma hi bihan
Ar patatez er vengleun
An daou lapous
Eet int du-hont
Al lano du
Ar mare du
Da dud koz Berlewane
Ar barr-amzer
Gouel ar hezeg en Plouilio
Gwalenn ar wennili
Peleh emañ ma farrez ?
Mir da goef gwenn
Pa vin koz
Kratatenn ma Fask kentañ
Evid ar brizonerien
Jerzey
Ar goañv
Plijoud a ra din
Ar gannerez koz
Me ‘gar ar bleuniou
Diviz etre an dour hag ar gwin
Da Etienne Rivollañ
En koun euz Marharid Fulup
Devez an dornañ
Dispenn ar hleuniou
Dastumet eo an est

An hader patatez
Me 'breno kêr Lannuon
Son ar veilladeg
Bloavez mad
Ar galvoder
Paotr ar zoup
Tomm ha yen
Ma zarmon devez ar pardon
Me 'm-eus greet nao lamp
Treuzi kêr Lannuon
Ar masoner
Ar morad braz
Yann an oll ezommou
Ar wir Vreizadeg
E-barz ar havell
An daou êl
Bloavez mad !...
Nedeleg laouen
Kontadenn Nedeleg
Bleun a zo en avalou
A hoñje paeet
Dui ar gwenn
Ar vinorez
Ar mêsaer deñved
An diou vinorez
Gwerz an dud didalvez
An hadañ patatez
An eur nevez
Tour Berlewane sklêrijennet evid ar mision en 1936
Tremenet int
Koukoug
Grev ar venajerien.
Sehor
Me 'm-eus tapet nao lamp
En daou venaj
KontadennNedeleg
An dornañ e Plouleh.

O ! Brezoneg

O Brezoneg, yez kaer ma bro
Daoust hag-eñ a rankfes lared kenavo
Daoust hag-eñ e vefes mouget
Ganim-ni ar Vretoned
Gand bugale
Kriz ha didrue'

O Brezoneg, yez kaer Breiz-Izel,
Te 'vez kavet brao gand an dud a-bell
Rag pa deuont dre amañ da redeg
E plij de kleved en brezoneg
Eur ganaouenn
Da heul an delenn.

Nann ! Brezoneg, yez pinvidig
Dond a raio a-raog ma vi maro-mik
Da astenn dit an dorn tud a galon
Evid adsevel 'hanout en he sav-sonn
Ma halli adarre
Kaozeal ha bale.

O Brezoneg desket war barlenn ma mamm
Te 'zo koz med c'hoaz evel nevez-flamm.
A-raog mervel 'nevoa laret din ma zad
Bez eveldon eur gwir Vreizad.
Desk ar galleg
Med kaoze brezoneg.

O Brezoneg, yez kaer bro-Arvor
Lakaet e vi c'hoaz en enor.
Dond a rez da vezañ adarre euz ar hiz.
Adkaoud a rez da blas er skol, en iliz,
E-touez ar labourerien,
E-touez ar skrivagnerien.

Ya, Brezoneg, yez êzet da gomz ha yez kaer,
Ne vi ket disprizet gand tud Bro-Dreger,
Ha gwelet e vo da vugale heb mez
O kanañ o hredenn en o yez,
Hag oh ober goude c'hoaz
Sin ar groaz.

En-tal ar groaz

Ton : O kalon zakr, pe eun all.

Eun deiz e oan o veaji,
Skuiz ha krog da fallgaloni.
En eun taol, e pleg an hent praz,
E teuas din gweled eur groaz.

Kerkent e oan eet diraki
Ha stouet evid adori
An hini a werzas Judaz
Hag a welen stag ouz ar groaz.

Pa 'm-oa lavaret eur bedenn,
Em-oa harpet outi ma fenn
Evid soñjal er poaniou braz
En-doa gouzañvet war ar groaz.

Souden e oan manet kousket
Ha treou kaer am-oa huñvreet
Ken e karjen bezañ pell c'hoaz
Chomet kousket en-tal ar groaz.

Dihunet en-kreiz ma huñvre,
E oa red din mond adarre :
Med skañvoh e oan 'vid biskoaz
Pa 'm-oa kousket en-tal ar groaz.

Di e karfen bezañ douget
Ma teufe din bezañ tapet
Pe skoet gand eur hleñved braz
Evid mervel en-tal ar groaz.

Ha bremañ war hent ar vuhe'
Pa vin dinerzet adarre,
Evel en deiz-se eh in c'hoaz
da ziskuizañ en-tal ar groaz.

Ha neuze en Berlewane,
Eun den a gleuzo din eur be',
Eun all 'h ay da lakaad son glaz,
Eun all da gerhel din ar groaz.

Ha goude, er vered didrouz,
En-kichenn iliz ma farrouz,

Da hortoz devez ar Varn vraz,
Me a gousko en-tal ar groaz.

Iliz Berlewane

Ton : Deiz am honfirmarsion.

En parrouz Berlewane a zo eun iliz kaer
N'eus ket kaerroh eviti nemed e Landreger.
N'eus hini ken kaer bolzet, ken hir ha ken uhel,
Bezañ eo ar belezenn war vêziou Breiz-Izel.

A-uz da gêr Lannuon emañ war eur mene'
Ne vije ket uhelloh neemd war Venez Bre.
Ar menez a zo anvet menez al levenez
Med o krapad warnezañ e ver skuiz aliez.

Rag a-hed biñs an Dreinded eh eus meur a bazenn,
Ya, kant diou ha daou-ugent, 'vid an dud koz eo tenn.
Koulskoude ne zoñjont ket distrei na chom a-dreñv
Rag arru war ar menez 'ver hanter-hent d'an Neñv.

He fatron eo an Dreinded, na pegen braz enor,
'Deus ket nemeur ar hras-se 'tousez ilizou Arvor.
Bep bloaz da zul an Dreinded e ra he gwir fardon,
En deiz-se e vez klevet nao añjelus o son.

Ya, rag evid enori an tri Ferson divin,
Ar hleier a zon teir gwech da noz ha da vintin,
Ha teir gwech all e sonont goude an overn-bred
War don ar hrampouez-gwiniz 'vez ar gouel war e hed.

An iliz he-deus ivez evid he fatronez
Mamm Doue, anvet Itron Varia Levenez.
Gwechall-goz eo bet anvet Itron Varia Neh.
Emañ 'uz d'an aoter vraz gand he mab war he breh.

Med c'hoaz he-deus eur Patron, an eskob braz sant Loup,
Ha d'ar pardon-mañ e teu pep hini gand e boup,
Hag evurusted ar Sant eh eo o bennigañ
Daoust ma reont dirakañ med c'hoarzin pe ouelañ.

Tregerni 'ra an iliz d'ar zul ha d'ar goueliou
Pa deu an armoniom da zikour an ograou,
Da gas toniou dudiuz war-zu ar Baradoz
Evid meuli an Dreinded ha goulenn he bennoz.

E-barz an tour ha n'eo ket manet da echui
Ar pevar gloh a gas pell eur gaer a zoniri.

An Aotrou David, eskob an naontegved kantved,
Dirag eur bobl diniver en-doa o badezet.

Ar hloh braz, kloh an Dreinded, n'eus ket ar seurt dezañ
Rag daou vil nao lur hanter a bouezañs 'zo ennañ.
An Aotrou kont Trogendi en-devoa 'vid paeron
Hag Itron vad ar Hruguil, markizez Mac-Mahon.

Kloh Itron Varia Lourd eh eo an eil brasañ.
Tremen daou vil lur a bouez ; paeron eo da hemañ
An Aotrou Zann Salaun bet mêt hed e vuhe'
Hag a oa ivez tad-koz ar mêt a zo hirie.

Tremen 'ra 'biou d'an dosenn meur a varr amzer fall
Daoust da ze an iliz koz a chom sonn ha divrall.
Bezañ zo ouz he souten pemp ha tregont gwareg¹
Tro-ha-tro d'an aoter vraz da gentañ zo daouzeg.

Red eo evid he hedi ober meur a gammed.
Kant pemp ha tregont troatad² a dle kaoud a-hed.
Ma oa eun tammig teñval, deut eh eo da skedi,
Kement a vegou tredan a zo stignet enni.

Pemp aoter a zo enni, teir en koad kizellet.
Unan euz ar re gaerrañ eo aoter an Dreinded.
Homañ a zo bet savet gand ar wiaderien,
Tud vrudet en o micher, pinvidig ha kristen.

Ar pez he-deus a gaerrañ, war-lerh an aoteriou,
Eh eo ar gador-brezeg evel kambr an ograou
Ha skeudennou hent ar Groaz koulz hag an daol zantel.
En koad emaint labouret ken frêz gand ar gizell.

Eun dra all a zo enni muioh disheñvel c'hoaz.
Hemañ a zo eur chapel dindan an aoter vraz.
Unan warn-ugent troatad³ a-hed ar gleuzenn gaer
Gand trizeg a ledander hag eziz a uhelder.

Er foñs e zo eun aoter hag en-kreiz ar chapel
Emañ ar Werhez Vari hag ar gwragez santel.
Sant Jozef ha Nikodem o lakaad en e ve'
Gand daerou 'n o daoulagad korv maro Mab Doue.

¹ pemp ha tregont gwareg : pemp gwareg ha tregont.

² Kant pemp ha tregont troatad : kant pemp troatad ha tregont.

³ Unan warn-ugent troatad : Eun troatad warn-ugent.

Na pegen dous eo pedi en eun iliz ken kaer.
Na pegen dous eo tremen enni eun tamm amzer.
Na pegen dous 'vo kousked 'n he hichenn da hortoz
Mond ivez gand an ene da hloar ar Baradoz.

Kaerder ma bro-Lannuon

Bro-Lannuon, bro ma havell,
An dachenn gaerrañ, me 'gred, euz Breiz-Izel.
Amañ eh om tre al Leo-Drêz hag an Nantouar.
En tu an aod e welom lanneier enne peziou rehell.
En tu all Menez-Bre, koajou enne gwez uhel.
Ha pa valeom dre an heñchou braz ,
E pep kroaz-hent e kavom eur groaz.

Lannuon a zo bet a-viskoaz darempredet.
Adaleg bremañ e vo c'hoaz muihoh brudet.
Muio-ouz-mui an nijerezed a darnijo 'uz d'on fenn
Ha war bark braz Serwel 'vont gwelet o tiskenn..
Tostoh 'vid Perroz amañ war douar Berlewane
E ver krog da zevel uzinou neve'.
Koulz hag echu eo an tour uhel 'vid ar radar.
Eur marvaill, eun neventi dispar.
Setu on zud hag a zo eet war-zu Pariz
'Zo o houlenn distrei d'ar gêr war o hiz.
Distroit 'ta, kaoud 'rafet souden, labour, bevañs, lojeiz.
Tro-dro da Lannuon e saver tier koant e-leiz,
Ha, da hras Doue, ne vanko da zen ebed
Na bara, na patatez, na kig na pesked,
Rag en Plomanah, en Enez-Veur, e Beg-Leger, e Lokemo,
Ar besketaerien 'vez gwelet dispont en o bagou,
A-benn d'ar barriou-mor o vond bemdez er-mêz
Da glask ormel ha siliou du-hont beteg ar Jentilez.
Ma welom eta ar pesketaer evel-se o poanial ;
Al labourer-douar a ra ive kenkoulz all
'Vid ma vo loened lard en e grevier
Ha trevajou fonnuz en e barkeier.
Wasoh evid biskoaz evid ar bla⁴
E-neus bet poan o tastum an danvez bara.
Rag bezañ er parkeier ne vije ket brao
O tastum an eost hag o lakaad an here dindan ar glao.
Med p'emañ ar labour kaer-ze war e gont,
Kousto pe gousto e talho da vond.
Evidom oll en-deus hadet ed.
Bremañ e hado hag emom⁵ adarre patatez abred.
Evel-se 'ta⁶ pep hini 'ra e vicher deuz e wellañ
'Vid kaerraad on bro, 'vid ma vo brao enni bevañ.

⁴ bla : bloaz.

⁵ emom or-bevo.

⁶ ta : teu.

Ar bugel, pa guita ar skol, 'vez laret dezañ gand e skolaer :
« Kerz da honid da vuhez, amañ 'halli dibab n'eus forz petore micher
Kerz da zeski bezañ toer, artizan-koad mar kerez,
Pe biker-mein er Sklêrder 'n eur vengleuz minerez ;
Med pa chomi war douar pe 'h i war ar mor,
Bez eun den leal ; ha d'az pro divenn heh enor. »
Setu ma sav eur yaouankiz leun a nerz kalon,
Troet da labourad, da ganañ ha da zon.
Ya, klevet 'refom c'hoaz ar vombard hag ar biniou,
Ha gante 'vo kaerreet on fardonioù.
Klevet 'vo ive istoh 'vid er Veilladeg
Komz ha kanañ en brezoneg.
Er yez-se desket war barlenn on mamm,
Eur yez koz hag a zo c'hoaz evel nevez-flamm,
A-berz on tud eo dim eun heritaj, eun teñzor.
Goud⁷ he lenn hag he skrivañ a zo eun enor.
Hag en deiz ma teuio tud Vreiz a-bez
Da ganañ o hredenn en o yez
Ne vo ket ken kaer evel on Bro goz
Leh all ebed, nemed ar Baradoz.

⁷ Goud : gouzoud.

Ar bara gwenn

Ar bara gwenn a zo klasket hag a blij d'an oll.
Da bep pred hag en pep ti e vez war an daol.
Hag an hini a zo bet taillet pe manket dezañ
A gompren welloh an dalvoudegez outañ.
A zo kaoz e-nevez soñj hag a gle an den
Ober da Zoue bemdez ar memez goulenn :
« Roit din hirie c'hoaz eun tamm bara,
Anez 'mo ket a nerz da chom en em za'.
Pa vez gwelet eur bugel fesonet mad ha zah
'Vez laret : hennez a zo warnañ liou ar bara poah,
Ya, ar bara evel an eost a zo eun dra zakr,
Hag an hini a ra dizurz gantañ 'zo eun den fallagr,
Rag 'benn 'vez arru war an daol prest da zebri
'Vez bet gantañ kalz a boan hag a zoursi.
Ze 'zo kaoz eo spontuz skei ar bara da vale
Ha teurel hanter dorziou en karr an teil-pave
War digarez lared 'vez kraz pe restajou ?
Trohañ nebeutoh ha tremen heb ober bruzunadou,
Ha soñjal en dud paour o-devez naon aliez
Hag er broiou e-leh ma zo dienez.
Soñjal ive eun tamm en poan ar labourer
Hag a zo bemdez er-mêz dindan an oll amzer
O trei an douar evid hadañ gwiniz en e dachenn
Gand ar c'hoant da weled an oll o kaoud bara gwenn,
Gand an esperañs da weled ar greunenn o tiwan,
Hag o rei goude-ze kant evid unan,
En eur houlenn m'he-devo da greski bannahou glao,
Ha goude da zizahañ da zarevi amzer vrao.
Neuze gand soursi 'vo dastumet da zornañ,
Ha kaset dustu d'ar vilin da vezañ malet.
Nag a labour, nag a boan ma vez soñjet
Dre bed plas e tremen ar winizenn
'Benn vez arru en ti-forn greet ganti bleun gwenn.
Goude-ze ar fornier, eñ kazi hanter-noaz,
An dour 'ruillal outañ o labourad an toaz
En-pad ma vez kousket stard an dud.
Abred en noz a-raog ma kan ar hog war e glud
'Benn 'vo sklêr an deiz 'vo c'hwez ar bara fresk.
Hag en-dro d'an ti-forn, zouden, 'n em gavo mesk.
Pa zavo an dud e teufont a-vandenn
Pep hini da glask e damm kreun melen.

Ya, ar bara 'vez klasket da gentañ.
Trugarez d'an hini a boah hag a bourvez anezañ.

Room skwer ha larom d'ar vugale
Tremen heb skei bara er sklabe',
Ha goulenn digand an Hini a zo Mestr war bep tra
Evid peb devez deuz on buhez : « eun tamm bara. »

Deom d'ober eur bale

Daou den 'm-eus klevet oa kaozeal na junte ket o haoz.
Chomet 'oan da zelaou euz petra 'oa kaoz.
An hini kentañ a lavare evel-henn :
« 'Vid an deizioù me 'h a d'ober eur valeaden
Pa vo klozet ar labour, eh in ive 'vel an dud all
Da weled eun tamm penaoz emañ kont e leh all,
Da weled an treou kaer, krouet gand Doue pell a zo,
Hag ar labouriou greet gand an dud nevez 'zo. »

« O ! eme egile, n'on ket memez ali ganeh.
M'on ket kuriuz, me 'mez c'hoant da vond neb leh.
Nann, 'm-eus ezomm 'bed da vond da weled Menez Sant Mikêl,
Nag ar Radom, nag ive an Tour Eiffel.
Pas muioh evid menezioù ar Pirene.
'N em gontanti 'ran gand gweled bemdez tosenñ Vre.
Nann, me n'in ket da zispign arhant da goll amzer.
Me 'gav gwellañ plas 'm-eus, eo er gêr. »

Pehini deuz an daou-ze a goazee ar gwellañ ?
Me 'm-eus roet rezon d'an hini kentañ.
'Vel just, n'hall ket an den bezañ bemdez o vale,
Peogwir e tle labourad evid gonid e vuhe'.
Med eur wech an amzer e ar plijadur d'e zaoulagad,
D'e gorv ha d'e spered e ra ive kalz a vad
Cheñch terrouar, mond d'ober eun diskuizadenn,
Da zoñjal, da êsaad eun tamm bihan kompren
En treou souezuz a zo oh ober ar bed-mañ,
Da weled pegement a dreou a zo lakaet war an douar evitañ.
Treou na fiñvont ket, treou all a gresk ha cheñch plas.
Bep seurt gwez, loened, seurt 'nevoa ket gwelet c'hoaz .
Da heul ze, e welo ive labouriou kaer,
Treou greet ha savet gand an dud a vicher,
En koad, en houarn, en mein, en simant,
Treou braz hag uhel, treou bihan ha koant.
Dirag ar labouriou-ze 'gle ket tremen heb ober van,
Med mond da lared trugarez d'ar re a laka o foan,
D'an ijinourien ha d'an artizaned,
D'ar re a dorr o horv hag a skuiz o spered
Da ivanti ha d'ober bep seurt binviou
Hag a zo eur rikour, a rent kemend a zervijou.
Ya, treou a zo hag a dalvez ar boan mond d'o gweled,
Hag ar re o-deus greet aneze 'dlefe o ano chom merket.

Deom eta d'ober eur bale, da ganañ gloar

Da Doue e-neus krouet an Neñv hag an douar.
Da lared meuleudi d'an dud a ra deuz o gwellañ
'Vid êzetaad ar bed,'vid ma vo brao d'an oll bevañ.

Ar grampouezerez

Piou 'n-eus ket anveet du-mañ en-kichenn an iliz,
An Dintin vad hag a ree krampouez-gwiniz ?
Den ne oar pegement a dud he-deus regalet
Ken mad e vije he hrampouez sukret.
Pa vije eur gouel er skol pe er barrouz
E ree beteg tregont dousenn krampouz.
Pa vije tomm pe yen, pell a-raog goulou de',
Heb goud da zen, e teue er-mêz he gwele,
Lakaad a ree uou ha bleud 'n eur pez terinenn.
Neuze gand lêz mad e ree an doazenn.
Tapoud a ree tomm, diou gleurh a lakae war an tan.
Poan he-dije 'n he hein, med ne ree ket a van.
Kement den a dremene dre gichenn he zi
A zante c'hwez vad e-leiz e fri
Hag a lare : « Me 'garfe kaoud eur grampouezenn domm.
Netra welloh evid lakaad an den en e blomm. »
An Dintin da dud he zi em-pad heh amzer
He-deus greet krampouez tano beb gwener
Barreg da lakaad eun den klañv da vezañ yah.
Med, allaz ! eun devez ar paour-kêz plah
A-uz d'he hleurh 'zo deut warni eur hlizenn yen
Hag e laras : « 'M-eus ket aon 'vin ket kap d'ober ken. »
Teurel a eras he rozell hag he sklisenn
En eur houlenn digand he zud eur bedenn.
Ha neuze o santoud e oa o vond da vervel,
E lakeas eun dousenn grampouez en he godell
Hag oh arruoud du-hont e laras da Zant Per :
« Degaset 'm-eus dah krampouez gwiniz greet er gêr. »
« Ma ! eme ar zant, biskoaz den 'nevoa greet kemend-all ! »
Lipad 'ree e vizied 'n eur lared : « N'int ket ket fall . »
Ha e-keid ma oa ar zant o tebri e grampouez,
E tapas an alhwez deuz e hodell, heb ober trouz,
E tigoras an nor vraz ken buan ha lared
Hag a 'h eas da azezañ e-touez ar zentezed.
Med abred e oa greet dezi souzañ, siwaz !
Laret 'oa dezi ne oa ket deread 'n he fenn noaz !
Evuruzamt Sant Per a zo tosteet
Da diskouel petra en-devoa greet.
Deuz ar grampouezenn diwezañ 'n-eus debret nemed ar vegenn
Ha gand an dro diavêz 'n-eus greet eur gurunenn.
Lakaad a ra anezi d'an Dintin war he bleo !
Evel-se sant Per 'n-eus dreset buan an treo'.
Ha setu aze penaoz ar grampouezerez koz
'Zo bet kurunet gand eur grampouezenn er Baradoz.

An azen

Me 'zo eur paour-kêz loen mud.
'Vez ket sellet ouzin gand kalz a dud,
O vezañ, 'michañs, ma'h on lovrigeneg
Ha brudet da vezañ berr ma spered, ha penneg.

Med ma karfe an dud soñjal
Petra 'm-eus greet evite gwechall :
War ma hein 'm-eus kaset Salver ar bed
Euz Betleem d'an Ejipt 'm-eus greet an hent war e hed.

Kaer zo lared 'm-eus eur penn kaled,
Deuz sant Jozef em-eus sentet,
Ha gras din, ar Mabig Jezuz hag ar Werhez
O-deus c'hoariet eun dro-gamm da Herodez.

Ya, me 'm-eus saoveteet d'an dud o Zalver
Hag abaoe ha beteg fin an amzer
E zo war gein an azen liou ludu
Eur merk burzuduz, eur groaz du.

Daoust da ze, nebeud a dud a zo anaoudeg ;
'M-eus ano ebed nemed : "penn-koad" pe "skouarneg" ;
Karget 'vez din, bezañ 'mez taoliou fouet
Hag aliez e vez tallet ha treud ma zamm boued.

Hirie emañ gouel ar Republik,
Fest gand ar pennou braz, an dud pinvidig,
Soniri, ebatou e Pariz pe zoken e Breiz
Euz an eil penn d'egile, tud o vale e-leiz.

Pebez sourpren, gweled a-greiz 'oan o peuri
Eur beleg hag eur Vreizadez o tond d'am zaludi.
Ken souezet e oan ha ken tenerraet ma halon
Ken 'h on souzet da zelled ouz an Aotrou Person.

« Te 'zoñje dit, emezañ, n'ez-toa na kar na par,
Med sell hi amañ, e Lannuon e-teus eur hoar :
Bezañ he-deus demdost memez kont a skiant ganit
Ha gand kalz a joa e teu da bokad dit.

« Ma ! 'mon-me, biken ken ne glemmin deuz ma stad
Pa welan gand piou eh on arru mad.
E-leh mond da weled prezidant ar Republik,
Oh deut da weled 'hanon ? Ma ! se 'zo bezañ chik !

Gweled 'ran e-peus tennet ma foltred.
Er gont-se ganah ne vin ket ankouaet.
Kenavo neuze, ma hoar ; kenavo, tud Lannuon.
Bennoz dah, c'hwi 'zo tud a feson. »

Bro e gavell

En eur barrouz e traou Breiz-Izel
Eun den yaouank chomet stag ouz bro e gavell
'M-eus gwelet krog en penn e gazeg Pechar,
O ruillal hag o plênnaad an douar
En eur ganañ. « Labourer eh on ha labourer e vin.
Ha ma bro Lannuon biken ne guitain.
Me a hado hag a denno euz douar Breiz
Danvez bara, hag a bep seurt frouez e-leiz. »
Er park 'oa ive eur plah yaouank frammet mad,
Daoubleget a-uz d'he faner goad
En eur hoarzin o tastum patatez.
Bevañs tud kêr 'vel an dud diwar ar mêz,
En eur park all eun devez a vezeven,
'M-eus gwelet ive daou yaouank o charread foenn ;
Ar foenn 'oa kaer ha fonnuz 'barz ar park ;
Setu zo greet d'ar gazeg eur pezh karg.
Pelloh c'hoaz 'm-eus gwelet eun den koz
O tilouzaoui hag o veskañ e irvin saoz ;
Ha pa 'oa sonet ar horn da vond da lein,
E-neus tremenet e zorn dre e gein.
Hag emberr da noz a-raog mond d'e goan,
Evid diskuizañ hag ankouaad e boan,
E savo war ar hleuz da zelled ouz eun dra gaer,
Da zelled ouz ar huz-heol en Beg-Leger.

An trouz

Lared hag adlared a ran
N'eo ket eur vuhez da vevañ !
Nann, bezañ o chom en bord eun hent braz
Pe en kreiz-kêr, kazi wasoh c'hoaz !
Noz-deiz, sul, gouel, evel luhed o tremen,
Kirri ponner, gweturioù, an eil stok 'n eben.
Eun trouz da derri d'an den e ziouskouarn
Ha da faouti e benn, pa n'eo ket houarn.
Me 'gav eun dra eneb da lezenn an natur
Lakaad 'n e gavell eun tammig krouadur
Ha lared dezañ kousked 'n eun dourni a seurt-se ;
A-dra-zur ne vefe ket roz e huñvre,
E-leh ar sioulder e vefe gwelet o vousec'hoarzin
Hag e klevje e vamm o lared dezañ d'ar mintin,
Gand he mouez ken brao ha ken doustadig :
« Kousket e oas ? Dihun neuze, ma êlig
Ha selaou eun tamm an avel o c'hwezañ
Ha war ar brank ar laouenan o kanañ. »
Ya, pegen brao bevañ sioul ha didrouz.
N'eo ket 'n eur hastell med 'n eun ti-plouz ;
Sevel en skreh eur lanneg pe en traou eur prad
Leh 'ver hanter-vevet gand an êzenn vad ;
En bord eur hoard, en disheol ar gwez kistin,
Pe 'uz d'an aod o santoud c'hwez ar bezin
Leh 'nefe peuh en noz da gousked 'n e wele
Ha d'ober ive ma ve skuiz eur housk da greiste'.
Ya, n'eus ket kaeroh 'vid bevañ er sioulder
Bezañ en peuh ha didrouz a zo eun dra gaer.
Se 'zo kaoz pa gomzom euz on zud varo,
E larom : « ma reposito en peuh o eneo. »
A ! Daoust hag-eñ eun devez a arruo
Ma vo gallet kas didrouz ar bed en-dro ?
Ya, rag pa laran, eme Fañch,
En dro-mañ eo poent d'an treou cheñch.
Ha pa ne gav ket ar baotred vraz an diskoulm,
Ma 'm-eus klasket ha gouvezet petra 'oa o stourm
'Vid harz an nijerezed⁸ d'ober "bankou" da derri on fenn !
'Vid ma nijfont en oabl ken didrouz ha kelien,
E vo tennet ar heflusker (pe ar "moter" ma keret⁹),
Ha lakeet 'n e blas eur "ressort", eun orjalenn rodellet ;
'Vel-se 'vo savet o foueziou de' evel d'eur moñtr

⁸ an nijerezed : an nijereziou.

⁹ keret : kerit.

Ha keid 'vo o tirodelli, e talho da vond ;
Memez tra 'vo greet d'ar hirri-tan, d'ar gweturiou,
Hag e karzfont ken didrouz hag eur haz dre an heñchou
Ha pa vo savet o foueziou war o hed,
Digojust, heb esañs, e refont tro ar bed.
Souhetom e teuio e daol da vad gand Fañch ;
En dro-ze, avad, eh hallfom lared :
 Toud an treou a cheñch.

Ma zoñjou e Traou-an-Dour

Evid pellaad euz trouz Gouel Yann e Lannuon,
E oan eet goude kreisteiz beteg Traou an Dour
D'ober eur valeadenn dre en heñchou don
Da zelaou ar lapoused o kanañ war ar skourr
O zoniou flour.

Dre zindan ar brankou 'm-eus kerzet dre eur harenn voan
Dre vesk ar balan alaouret, hep hent na gwenojenn.
Ha, goude bezañ treuzet n'ouzon ped park bihan,
Am-eus kavet daou den o foñs eun draonienn
O trei o fenn.

Kalz a blijadur 'n-eus greet dim 'n em gaved
Ha 'n em vriatet om e disheol eur voujenn haleg.
Rag pell 'zo etrezom 'vel eul liamm a zo skoulmet
Hag ar varzez he-deus greet din eun degemer kaloneg
E brezoneg.

Yann 'n-eus lezet e foenn ha tapet war e skoaz e forh
'Vid dond da zistouvañ din daou pe dri doull-karr
En eur houlenn diganin, kazi gand eun tamm lorh :
« Daoust hag ho-peus gwelet bravoh terouar
War an douar ? »

Ma feiz, 'm-eus ket, 'm-eus aon, amañ 'vefe brao bevañ,
Sur, ma ne vijen ket bet ken stag ouz ma farrouz
E vijen chomet da bedi ha da ziskuizañ
Hag em-ije savet en draonienn-mañ ken didrouz
Eul lojenn blouz.

Pa zellan 'uz d'am fenn pegen kaer bolz an neñv,
Dindan ma zreid ar foenn trohet krog da wennañ,
War ar hleuniou, e-leiz a beziou gwevn,
Er parkeier me 'ghev e-touez an ed o tisahañ
Ar skrilled o kanañ.

En draonienn-mañ ar hrouadur a wel labour e Grouer
Ha pep tra, me 'gred, a doug an den da vezañ fur,
Santoud c'hwez ar bleuniou, gweled o liviou kaer.
Ya, amañ sioul, me 'gavfe e-touez ar glazur
Ma flijadur.

Hirie n'hallan ket chom, med eun devez all me 'garfe dond
Da lared amañ er sioulder ma chapeled diwezañ,

Daoulinet aze war mein minerez ar pont
Ha goude, da heul ar goulmig, e hallfen kanañ
Ma hantik kaerrañ.

Da zerr-noz e larin d'am mestr divin :
« Lezit ahanon da gouezañ 'barz ar ster.
Lezit ma horv da vond gand an dour d'ar vilin,
Ha ma ene da bignal war askell an alhweder
Beteg Sant Per.

An deiz kentañ a viz Mae

Hirie eo deut abred an de'
N'eo ket yen, na glao nag avel.
An heol du-hont dreist Menez-Bre
A sked war vêziou Breiz-Izel.

Ar lapoused diwar ar skourr
A huch warnom a-bouez o fenn :
« Hirie emañ gouel ar labour.
Red eo d'an oll heuill ar lezenn. »

P'emañ an deiz kentañ a viz Mae,
An dud 'gle kroaziañ o diouvreh.
Se n'eo ket bezañ didalve'
'Vid tehel eun tamm euz ar beh.

Nann, sur mad, n'eo ket divennet
Ober eun tamm diskuizadenn
Na poz d'ober eur horneded¹⁰
Pe d'ober eur valeadenn.

Neuze, 'vid heuill gouel ar labour,
Deom gand on mignoned vad,
Pa 'h eo tomm an heol, plên an dour,
Da weled enezenn Vriad.

Er vag om eet deuz ar wetur,
Treuzi ar mor 'zo bet plijuz,
hed en deiz 'meum bet plijadur.
Bihan ha braz 'oam evuruz.

Kavet 'm-eus brao an enezenn.
Bale dre 'n heñchou bihan moan,
Kleuniou 'zo ha warne belen¹¹,
'N o zouez ar lapoused a gan.

War an dosenn zo eur chapel
Ha beteg enni om savet
Hag eno 'n eur lonkañ avel,
Eur bedennig e-meum laret.

Ha d'abardaez a-raog return,

¹⁰ eur horneded : en em lakaad en eur horn.

¹¹ belen : balan.

D'an enezenn 'meum greet an dro,
Ha deuz ar vag 'savem on dorn
Da lared : « Briad, Kenavo. »

Achu an deiz kentañ 'viz Mae ;
Tremen 'h a pep gouel ha pep tra ;
Red mond d'ar labour adarre
Evid gonid on zamm bara.

Ma hi bihan

Ton : Ho mamm

Deuz an Nantouar eh on
Deuz an Nantouar
Hag er horn brao-ze, 'vidon
Hag er horn brao-ze,
Ma zad e-neus savet eun ti (bis)
Hag eur hraouig koant d'am hi
Hag eur hraouig karet.

Ya, n'eo ket gwall-vraz ar hraou
Ya, n'eo ket gwall-vraz.
Med ar plas 'zo 'barz dim on-daou
Med ar plas 'zo 'barz dim,
Pa vez o krignad e askorn (bis)
Me a vez chouchet er horn
Me a vez chouchet.

Goude war dreujou e zor
Goude war dreujou
Deuz leh ma welan ar mor
Deuz leh ma welan
Me 'h a 'n em hoazez pe 'n em gluch (bis)
Da hoari gand ma hi-pluch
Da hoari gantañ.

'Vel-se n'am-ez ket a doan
'Vel-se n'am-ez ket
Rag pa harz ma hi bihan
Rag pa harz ma hi
Ma zad a deu d'ar red d'ar gêr (bis)
Neuze 'vez tapet ar laer
Nezuze 'vez tapet.

Me a zo brao din 'n em zi
Me a zo brao din.
Kreski 'ran da heul ma hi
Kreski 'ran d'e heul,
Hag eun deiz 'vel ma zad ive (bis)
Me 'gano soniou neve'
Me gano soniou.

D'an 6 a viz Mae 1967.

Ar patatez er vengleun.

Er bloaz seiz ha tri-ugent 'oa bet eur mare du
Ha ne oar ket o hortoz eun darvoud all dustu
Med eur bloavez goude setu ar mare gwenn,
Peadra d'ar labourer da goll e gokenn.
Hadet ha bet 'nevoa leiz an douar a batatez,
Med, allaz, hini 'bed n'halle bountañ er-mêz.
Setu pa n'int ket er-mêz, e-barz e rankont mond.
Ya, 'n eun toull da louedi, 'vel-se 'oa kont.
Greet 'vije dezañ kas ar harr da gichenn ar hleun
Ha diskargañ aneze a-benn-bouell er vengleun ;
Teurel warne ampoezon ma vijent ket debret :
Evel-se eo distrujañ bevañs ar Vretoned.
Biskoaz 'vel just ne oa bet gwelet kemend-all
Ha diêz goud piou a oa da damall.
Koulskoude Doue, ar Hrouer hag ar Mestr,
N'houll ket 'vefe 'vel-se distrujet an est¹²,
Rag, pa 'nevoa maget pemp mil den gand pemp bara
'Nevoa laret dastum ar peurrest ma vije kollet netra.
Ya, nag eo despetuz da labourer Breiz koll e boan
Ha soñjal a zo bugale du oh ober kov moan.
Med arabad eo doned da damall anezañ
Peogwir 'pad ar bloaz e ra deuz e wellañ
Evid hadañ muiañ ma hall patatez hag ed
O soñjal lodenni gand ar re n'o-deus ket.
Ha glaharet 'vez, skrapad a ra e vleo
Pa vez glebiet e est, pa'h a e batatez gand ar reo.
Med daoust ma vez braz e goll, ponner e veh,
Ne ra ket a drouz na klask kemer an teh.
Ne houl' nemed laoskad eun tamm ar fiseleñ¹³
Ma kredo, ma welo dirakañ sklêrijenn
Da halloud lezel eur mab pe eur verh
Da derhel e venaj war e lerh,
Da drei ha da denañ euz douar Breiz
Peadra da vogañ tud e-leiz,
Ma vo ar Breton brudet bepred
Evid bezañ paotr ar patatez abred
Ma vont debret, gwerzet en o friz,
'Vid ma hallo ar labourer bevañ en onestiz,
Da hortoz kaoud ive e dammig koñje.
Ya, da hortoz ken vo eet e gorr paour en e ve'¹⁴

¹² est : an eost.

¹³ : nompaz en em ganna (?)

¹⁴ ve' : en e vez.

Hag e spered da beuh Doue.

An daou lapous

Da Douroni en Tregastell
'Oan eet da vale eur zulvez.
Diwar an aod e welen pell,
Pell dreist kastell Kostaerez.
Brao 'oa gweled ar herreg gwenn,
An evned-mor, eüruz ha kreñv,
Tro-dro d'ar zeiz enezenn¹⁵
O tarnijal war-du an neñv.

Med eul lestr barz leun a betrol
An "Torrez-Canion" 'zo trohet,
Hag ar mor 'n-eus ruillet 'n eun taol
Ar zoubenn war ar Vretoned.
Duet eo kement tra 'oa gwenn ;
N'eo ket hañval ken aochou Breiz ;
Ar pesked 'zavont ken o fenn ;
An evned-mor a varv a-leiz.

Gwelet 'm-eus bet ped lapous
War an drêzenn o tifrinkel.
O fluñv 'oa glebiet gand dour louz
Ha ne oant ket evid nijal ?
Selled 'reent truezuz ouzin,
Ha me da dapoud eur vriad
Da gas ane d'ar gêr ganin
Da gennerzi ha da nêtaad.

Ma ! Daoust d'ar boan 'm-eus kemeret,
D'ar labour lakaet en o ferz,
Oll nemed daou ez int marvet.
Med an daou 'zo chomet 'zo serz.
'N em dommet ez int en em zi.
Ne guitaint ken ahanon.
Unan 'm-eus badezet "Torry".
Egile 'm-eus anvet "Kanion".

¹⁵ d'ar zeiz enezenn : ar Jentilez, troet fall e galleg.

Eet int du-hont

Ton : Deiz ma Honfirmasion.

Eet int du-hont adarre, on zud muiañ-karet,
Ped ha pere dioute ne vefont ket gwelet ?
Med pe vevañ pe vervel a refont pell ouzim,
Birviken ar zoñj ane' ne deho diganim.

An daerou 'n o daoulagad 'deus laret kenavo
D'o herent, d'o mignoned, d'o zier ha d'o bro ;
Eet int heb goud o-unan peleh e oant o vond,
Petra 'oa ouz o gortoz, penaoz e vije kont.

En bleuñvenn o yaouankiz o-deus ranket kuitaad
Ha lezel en nehamant o zud en bep seurt stad.
An dra-ze a oa kaled, med 'vid ar baotred-mañ,
E tremeno e peb leh an devez da gentañ.

Ya, galloud a reer lared n'int ket bet didalvez ;
Eet int oll d'an eur verket, hag hep klask digarez ;
E-leh chom da hirvoudi, da stourm, d'ober gwad fall,
Eo fellet de' senti prim 'vel o zud en dro all.

E ti ar labourerien eh eo braz an diouer ;
Ar re wellañ o tehel p'emañ an eost d'ober ;
Ma oa a-raog war ar mêz an dud arru tano,
En dro-mañ ar parkeier 'zo koulz lared goullo.

Med nim hag a zo chomet a gleo 'n em zikour,
Ha bountañ oll on daouarn donnoh c'hoaz er labour :
Red 'vo hadañ hag eostañ, sevel, gwellaad loened,
Ma ne vanko ket a voued d'on faour-kêz soudarded.

Peogwir o-deus diskouelet kemend a nerz-kalon,
Arabad dim-ni bezañ 'n o heñver digalon ;
Groom kement a hallfom evid o frealzi,
Ha evid ma chomefom e talhfom da bedi.

Ar re-mañ a oa didrouz, ne oant ket o klask skei,
Hag eh int kaset du-hont 'vel kas an oan d'ar blei'.
Na truezuz eo soñjal er zamm 'zo war o chouk ;
Med esperoud 'reom 'vo treh ar vad d'an droug.

Teurvezit, o ma Doue ! rei eun degemer vad
D'ar re evid on divenn a ranko skuill o gwad ;

Grit ma houzañfont o foan evel gwir verzerien,
Roit de' ar peuh en neñv, ha peb a gurunenn.

Miz Gwengolo 1939.

Al lano du

Me 'zo eur paour-kêz martolod
Glaharet gand ar mare du.
Deuz ar mazout 'mo bet ma lod
Ha n'ankouezin ket dioustu.

Eur plah-yaouank deuz ar Sklêrder
A garen a-greiz ma halon.
Homañ 'oa koant, dous ha seder,
Heh ano a oa Marivon.

Eun deiz 'n eur vale en Perroz
'Oam diskennet beteg Trêztraou
Hag eno 'oa juntet on haoz,
Chouchet war eur garreg on-daou.

Med me a ranke an deiz-se
Mond adarre d'an Oriant
Evid echui ma hoñje
E-leh ma oa ma batimant.

Homañ 'douas bezañ fidel
En eur lared din : « kenavo ;
Amañ, 'mezi, war ar rohell,
'Kavi 'hanon pa vi distro. »

Med setu eun taol, a-greiz-toud,
Eun taol bet arruet biskoaz.
Duet on aochou gand mazout
Ha me 'zo bet ar muiañ c'hoaz.

Degaset zo soudarded
Evid dastum ar petrol dru'.
Ha setu darn euz ar merhed
A zo eet d'o zikour dioustu.

Ha Marivon 'oa pres warni
Da vond ive da rei an dorn.
Eur soudard 'n-eus laret dezi :
« Krog en eun tu deuz ma helorn. »

Goude dorn-ha-dorn int karzet
E-leh chom da nêtaad an aod.
Setu penaoz en-deus trehet
Ar soudard war ar martolod.

Manet on war ma hemend-all.
Kaer 'm-eus kaoud eur pompon ru'.
Marivon 'zo eet gand eun all
Mil malloz war al lano du.

D'ar 15 a viz Mae 1967.

Ar mare du

O ! ma bro gaer, setu 'te en eur stad truezuz.
Koñje Pask a zo troet adarre en eun darvoud.
An dour mor, glaz, sklêr ha yahuz,
N'e' ket ken nemed gwelien koavennet gand mazout.
Duet eo kement tra a zo gwenn.
N'e' ket anaveabl ken aochou Breiz.
Ar pesked ne zavont ken o fenn.
Ar lapoused en druzoni o vervel e-leiz.

A-viskoaz emañ 'n on bro ar hiz
D'an hini a dorr gwer da brenañ aneze.
Ha klevet e-meum lezenn an Iliz
Koulz hag en gourhemennou Doue :
« Domaj ebed da den ne ri,
N'a ket da draillañ o zreou d'an dud all,
Pa m'az-teus greet, hast buan repara,
Anez n'out ket eun den leal ! »

Repara, med piou 'zo da vezañ tamallet ?
Aze marteze eo diêz a-walh respont.
Da hortoz se, eo labezet o bro d'ar Vretoned.
Ha lakeet eur labour digar war o hont.
Petore kudenn hag ive petore koll
Da dud ar vro, na d'ar zoudarded n'e' ket brao
Bezañ o tastum pesked nag evned beuzet er petrol,
Nag o rastellad loustoni dindan ar glao.

Tañveet e-mom eur zoubenn dreñk ha dru'
Ha n'houllfem ken ar c'hwez nag ar blaz
Da vohannañ ma halljem lared : « Kenavo d'ar mare du ».
Ha kaoud an esperañs da weled c'hoaz
Ar pesked o fringal e-barz an dour,
Ar lapoused o nijal skañv o diouaskell.
Paotred ar bagou o vevañ deuz o labour
Hag an dud o vond d'an aod 'n hañv tro-dro da Vreiz-Izel.

Da dud koz Berlewane

Kleier braz Berlewane 'zo o-fevar o son
En o zour gwintet uhel, 'uz da gêr Lannuon,
Evid gervel d'an iliz oll dud koz ar barrouz ;
Ouspenn eur hant 'zo oute, o vevañ ken didrouz.

An ograou 'zo o son, kanañ 'reer kantikou
'Vid trugarekaad Doue euz kemend a hrasou,
Ha 'vid pedi ar Werhez da vezañ o skoazell
'Pad ma kinnig ar beleg ar sakrifis santel.

O ferson hag a garont a lar de' 'n e zarmon
Da heul aliou mad, ar joa 'zo 'n e galon
En eur bedi an Drinded da rei de' he bennoz,
Da astenn c'hoaz o buhez d'ar barrouzianiz koz.

Pa zo gleet de' doujañs, enor ha karante',
'Vid ober de' plijadur, an Aotrou Mêr goude
'N-eus o fedet da dostaad ouz eun daol d'azezañ,
War behini 'vo servijet eur pred euz ar gwellañ.

Kalz 'ne' 'zo serz ha seder, evuruz 'n o hozni :
Kalz all a zo daoubleget, brevet o izili ;
'N o zouez zo soudarded koz, bet gwasket er brezel.
Meuleudi de' da vezañ divennet Breiz-Izel.

Meuleudi d'ar re a zo mamm-goz mammiou-goz
Pere n'int ket bet gwechall 'n o gwele 'pad an noz ;
Mond a reent da dal ar havell heb damanti d'o foan
'Dal ma klevent o ouelañ o bugale vihan.

Bebet 'deus, en onestiz, daoust ma oar¹⁶ paour gwechall.
Gonezet 'deus o bara dimeuz c'hwezenn o zal
Ar labourerien-douar hag an dud a-vicher
'Deus poaniet evidom-ni, dindan an oll amzer.

Hirie e oant unanet, greet 'deus eur vlagadenn,
Oll eh eont da zrinkañ, da zevel o gwerenn ;
Trinkom-ni gante ive, larom de' : « yhed mad »,
Ha diskouelom de' bepred on anaoudegez vad.

Kalz deuz o noad 'zo galvet gand Doue d'o gwir vro ;
Hirie e soñjom er re 'zo galvet nevez 'zo :

¹⁶ oar : ma vezed.

Pep hini en e gerent, en e vignoned koz.
Esperom int evuruz en neñv ouz on gortoz.

Red eo evid mond d'an neñv gouzañv war an douar ;
Med eno 'vezer paeet, den 'vo dall na bouzar ;
En neñv an oll 'vo yaouank ha, 'kichenn-ha-'kichenn,
Ar paour hag ar pinvidig a gano da viken.

Ar barr-amzer

Gand joa 'teuan d'an Nantouar¹⁷
Evid pellaad euz trouz Pariz
'Leh ma ven dindan an douar
O labourad 'pad unneg miz,
Bebet gand an deñvalijenn,
Hast a-mez pa arru an hañv
Da dond da aveli ma fenn
Ha 'pad eur miz da ziskuizañ.

En eur horn brao euz Breiz-Izel,
'Kichenn ti ar barz Yann Derrien,
'Leh na hwez ket kreñv an avel,
Me a zav ma zammig tantenn ;
An êzenn-ze 'vez yahuz ha fresk.
Me 'gousk eno 'vel eur roue ;
Er mor me 'neuy evel eur pesk
Ha war an trêz me 'gan goude.

Med setu deut eun avel zod,
Kaset gantañ ma zamm tantenn ;
'Bdenn ma oan distro euz an aod
'Oa arru en beg eur wezenn
'Vel eur gwiñver heb damanti
Me 'zo krapet war veg ar brank
Evid tapoud ma zammig ti
Da hadpoz e-mesk ar fank.

An amzer 'oa dichadennet :
Bez' oa ar c'hweh a viz goueren.
Meur a den a oa bet beuzet.
'Vite 'm-oa laret eur bedenn.
Med an heol 'deu goude ar glao.
Rouzet 'm-eus ma hrohenn abaoe.
Bet 'm-eus sunveziou tomm ha brao
Da achui ma zamm koñje.

¹⁷ Nantouar : Nant Douar, e Louanneg.

Gouel ar hezeg en Plouilio

War don *An durzunell*.

'Vel bep bloaz zo diredet tud a-bell hag e-leiz
Da unan dimeuz braoñ goueliou a zo e Breiz :
Gouel ebed ne blij kement da dud vad ar mêziou
Evel gouel ar hezeg en miz east en Plouilio.

Kalz a dreou souezuz ho-peus-c'hwi desket d'ho kezeg.
Evelдох e komprenont mad-kaer ar brezoneg ;
Labourad, trei an douar, ha dañsal er goueliou.
Mirit bepred ho kezeg, o paotred Plouilio !

Pa glevont mouez o mestrou e teuont war o lerh
O soñjal kad eun tamm sukr, pe kentoh eun tamm kerh,
Ha goude-ze 'reont bep seurt soubleseou ;
Dalhit d'ober evel-se, o paotred Plouilio !

Nann, kavalerien yaouank, ken lest ha ken dishual,
Na vez kavet nemeur 'barz er parrouziou all ;
Paotred ken skañv ha kezeg, n'eus nemed er sirkou
Barreg da ober ar pezh a ra reou Blouilio.

N'emañ ket war o hrohenn roudou an taoliou fouet,
Nag ar feson da vezañ re daillet de' ar boued ;
Ne gleont ket kousked war kleriou barrikennou ;
Pegen brao e kle bezañ kezeg en Plouilio.

Ar rouanez a vez koant hag he flahed-enor,
Koefet ha gwisket faro en giz on bro-Arvor ;
Dudiuz e vez kleved ar vombard, ar biniou
En gouel brudet ar hezeg beb bloaz en Plouilio.

Gwalenn ar wennili

Me 'm-eus gwelet eur wennili¹⁸,
La digedon la don ri lon la,
E oa ganti eur begad pri
O vond en siminal ma zi.

« Peleh, emon-me, 'h ez evel-se ? »
« D'ober, 'mezi, eun neiz neve'
El leh em-oa greet warlene. »

Ar lapousig 'oa dishual
Hag en em lakaas da zañsal
A-raog diskenn 'n em ziminal.

A-greiz-oll 'n eur zelled ouzin
Hag hi d'astenn he zroad kleiz din,
'N eur houlenn eun dra diganin.

« Deuit, mar plij, da zilemel
Eur walenn lakaet du-hont pell
War ma zroad 'vidoh, dimezell. »

« Ma mignon Jañ-Mari
Soudard du-hont en Aljeri
'Nevoa tapet eur wennili.

Lakeet war he zroad eur walenn
Peget warni eur berlezenn
Da degas d'he dousig Jermen.

Ma ra ar wennili he nez
Me 'raio ive eun devez
Pa vo distro ma zaoudard kêz. »

Neuze e hallo ar wennili,
E-leh distrei d'an Aljeri,
Chom ganim on-daou en on zi.

D'an 8 a viz Mae 1967.

¹⁸ eur wennili : lakaet gourel gand Maria Prat. Lakaet eo bet gwregel er skrid-se.

Peleh emañ ma farrez ?

Ton : Ar chaseour.

Me 'gred, Doue, en e vadelez
Direi tra la la dira la
N'eus ket krouet ar paotrig kêz
Evid bevañ heb eur barrez.

Perag chom heb na kar na par
Pa zo lakaet 'vidon, me 'oar,
Eur plahig fur war an douar.

Med piou eh eo ? peleh emañ ?
Noz ha deiz enni e soñjan,
Ha kouezañ warni a glaskan.

Heh ano 'h eo daoust pehini ?
Pe 'h eo Nina pe 'h eo Nini,
Pe 'h eo Soaz pe 'h eo Mari ?

Pa n'em-eus he gwelet biskoaz
N'onn ket pe 'h eo bihan pe vraz
P'he-deus daoulagad rouz pe hlaz ?

P'he-deus bleo du pe bleo melen,
Pe 'h int trohet a-rez he fenn,
Pe war he chouk 'n eur vlañsoñenn ?

Hast 'm-eus d'anveoud ar plahig,
Daoust pe 'h eo paour pe 'h eo pinvidig,
Pe 'h eo dous evel eur goulmig ?

Peleh out 'ta, o ma flah kêz !
Pe out en kêr pe war ar mêz.
Klask a ran 'hanout hep paouez.

Hag eun deiz pa'm-mo da gavet
D'am zi dustu 'vi degaset,
Ha biken er-mêz 'vi lakaet.

Pa 'z-to roet da zorn¹⁹ din-me,
Me a ouestlo dit ma buhe'
Dre eur pok leun a garante'.

¹⁹ da zorn : da dorn, e tregerieg rik.

Neuze 'hi in ganit d'an iliz
Evid lakaad dit war da viz
Eur walenn arhant euz ar hiz.

Goude 'mom plijadur e-leiz.
Kanañ refom gand joa 'n on hreiz
En brezoneg gloar d'on bro, Breiz.

Mir da goef gwenn

Mir da goef gwenn, plah-yaouank diwar ar mêz.
Gantañ te a viro êzet da enor ha da furnez.
Marteze en dañsou te 'vo diskouelet gand ar biz
Med kavet 'vi faro da deread 'barz an iliz
Gand eur hoof gwenn
War da benn.

Mir da goef gwenn, plah-yaouank diwar ar mêz ;
Rag an tri dra-mañ a dle mond asamblez :
Ar feiz, at brezoneg hag ar hoof dantelezet ;
Evel da vamm ha da vamm-goz me az ped da vired
Eur hoof gwenn
War da benn.

Mir da goef gwenn, plah-yaouank diwar ar mêz,
Rag n'out ket deread o vond da varhad ar lêz,
Nag o vond d'ar foar da brenañ pe da werzañ loened
En eur harr nag en eur wetur ma na 'deus ket
Eur hoof gwenn
War da benn.

Mir da goef gwenn, plah-yaouank diwar ar mêz.
Te hag a rank goro, boueta, kas ar zaout er-mêz.
Ne dalv ket dit êsaad bezañ 'vel eur gêrizenn²⁰
Rag ne vez²¹ en gwirionez nemed eur vaskaradenn
Heb eur hoof gwenn
War da benn.

Mir da goef gwenn, plah-yaouank diwar ar mêz.
Gantañ 'vi kemeret dindan skoazell ar Werhez.
Lez an tokou gand an itronezed a reñk uhel ;
En-kreiz sioulder ar mêziou te 'vo eun dimezell,
Gand eur hoof gwenn
War da benn

Mir da goef gwenn, plah-yaouank diwar ar mêz.
Chom da labourad en-kichenn da dud a garez.
Mir gwiskamant kaer on bro ken mad
Ken ma teuio Doue d'az kervel evid lakaad
War da benn
Eur gurunenn.

²⁰ eur gêrizenn : ger ijinet gand Maria Prat : eur plah o chom e kêr.

²¹ ne vez : ne vezez.

Pa vin koz

Lavar din, ma mignon, petra a zo kirieg
Ma 'h out en-keñver Doue, siwaz, ken lezireg ?
Morse 'vez²² gwelet, na d'ar zul na d'ar goueliou
O vond d'an overenn na d'ar gousperou ;
Morse 'n ez ti ne vez klevet, war a lerer,
Credo, Confiteor, Pater na noster ;
Bevañ a rez kazi evel eun aneval
O lezel da gorv digabestr ha dishual.
Koulskoude, evel an oll, te a gle goud ervad
Penaoz e-teus ive eun ene da zaovetaad.

A ! ma den mad, diwezatoh, pa vin koz,
Evel dout ive, me a bedo beure ha noz
Ha d'ar zul, e-leh mond d'an ostaleriou
Me ah aio ganit d'an overenn ha d'ar gousperou.
Med bremañ pa'h on en-kreiz ma yaouankiz,
Evel an dud all, me a fell din kemer ma frankiz.
Pa ne vin ken evid heuillañ plijadur ar bed,
Me, avad, a heulio lezenn Doue war he hed.
Ya, ya, pa laran, abred a-walh e vin goude
Da zerviji Doue, ha da bleal gand ma ene.

A ! ma den paour, te 'gred eh out sur da gozañ ;
Koulskoude marteze, 'benn ma savo an heol kentañ,
Ar mestr braz, on Aotroun a degaso dit an hucher
Hag a raio dit brao-mad ober an torr-lizer.
Hag heb gortoz ganit gourmikêl na treou all
Mond en karr an Ankou, ha prim-ha-prim d'ar bed all.
Ha neuze, paotr paour e lavari : « ma vijen eet da goz
Ha neuze eet ive gand ar reou all d'ar baradoz.
Med pa 'm-eus ket bet ar hras da vezañ lezet da gozañ
N'on ket peleh 'h an da vezañ kaset bremañ ? »

Med pa laran, me a grede stard penaoz
Ne oa ket an Aotrou, kaer 'teus lared, en-gortoz
Da weled 'hanon o tiskouel bremañ ma fe',
Na da lemel diganin ken feulz ma buhe',
Peogwir e oan en zoñj mad da ginnig dezañ
Eur lodenn deuz ma buhez, ma deziou diwezañ.
Goud a ra : n'em-eus ket amzer da vond d'an ofisou.
D'ar zul ar beure eh an d'ar Honkour boulou.
A-raog mond, me d'ober kerhad eur garg melchon.

²² 'vez : vezez.

Laret em-eus se dija d'an Aotrou Person.

Eur wech c'hoaz me 'lar dit emañ Doue en-gortoz
Da weled ar reou yaouank koulz hag ar reou goz
Ouz e zerviji hag o vevañ er furnez,
Rag n'eo ket eur pillaouer Doue an oll zantelez.
Pa vi arru dall ha bouzar, brevet da izili,
E-leh selaou ar hoz kamm-koz oh hirvoudi,
E laro dit : « Bet e-teus amzer a-walh, yehed ha nerz,
Ha pa 'teus goulennet lakaad eun devez 'n em herz,
Dalh da labourad ha da zañsal pa out koz
Pell deuz ma iliz ha pell deuz ar Baradoz. »

Kravatenn ma fask kentañ

War don : *Deiz ma honfirmasion.*

Eur bugel savet mad a reas da Zoue
Ar veu da vired warnañ dre-oll hed e vuhe'
Kravatenn e bask kentañ, gwenn-kann evel an erh.
Ar gwel anezi hen dougje da chom dinamm ha gwerh.

'N eun tamm paper, gand doujañs, he mire 'n e hodell,
Ha pa vije tentet e ree outi eur zell :
« O kravatenn wenn vrodet ! te a ra din, emezañ,
Soñjal pegen glan e oan devez ma fask kentañ.

O kravatenn wenn ! te 'zo test deuz ar le 'm-oa greet
En deiz ma degemerenn ma Zalver benniget ;
Te a oa 'n em herhenn pa oan 'n em ouestlet d'ar Werhez.
Sikour ahanon bremañ da vired ma furnez.

Mond a reas da zoudard p'oa kroget ar brezel,
Hag hep soñjal e rankje war an dachenn mervel,
'Oa laouen hag evuruz o lared kenavo.
Eun enor 'oa evitañ mond da zivenn e vro.

E oa o stourm gand kalon ouz e enebourien
Pa oa tizet 'n e gostez gand eun tamm bombezenn ;
Kouezañ 'reas d'an douar, hag ar merzer yaouank
A wele en-dro dezañ e wad o ruillad stank.

E godell e gapotenn 'oa e gravatenn wenn.
Pa he gwelas distrempet 'reas eur youhadenn.
Eur soudard a dosteas da houlenn digantañ :
« Petra 'rafen evidout en da eur diwezañ ? »

Respont a reas dezañ : « Kas d'am mamm ha d'am zad
Ma hravatenn wenn ruziet 'n em diwezañ stourmad ;
Lar de' 'm-eus ket he saotret gand ar pehed marvel,
Med gand ar gwad a skuillan o tivenn Breiz-Izel. »

Evid ar brizonerien

Ton : *O sant Jozef, ni ho supli.*

Itron Varia ar Yeoded
Pedit evid on zoudarded
A zo du-hont oh hirvoudi.
Deut d'ho souten, d'o frealzi.

Selaouit merhed yaouank Breiz
A zo deut d'ho chapel e-leiz
'Vid ho pedi da vired dim
Ar re 'zo ken karet ganim.

Dalhet int evel sklavourien
Daou vloaz 'zo en eur vro estren.
Pa 'h eo o stad ken truezuz
Bet²³ evite madelezuz.

Nim n'hallom ket d'o gweled,
Med c'hwi, Mari, a hall bepred
Evel eur Vamm chom war o zro
Ken ma sono eur an distro.

Teurvezit noz-deiz o diwall
Deuz a beb droug, deuz peb reuz fall,
Deuz peb darvoud, deuz pep kleñved,
Hag ive deuz a bep pehed.

Pa vo erh ha skorn er goañv
'Vel bugale, deut d'o hlozañ,
Dindan ho mantell, o Mamm vad !
Evid ma chomo tomm o gwad.

Harzit ane' da 'n em veñji,
Hag ive da fallgaloni.
Neuze o foan 'dalvezo de'
'Vid silvidigez o ene.

O Jezuz, roit de' ar hras
Da opten 'n eur dougen o hroaz
Evid o bro gras ha pardon
Ma 'deus ofañset ho kalon.

²³ Bet : bezit.

Ma rank unan bennag mervel
Heb distrei d'e vro Breiz-Izel,
Roit dezañ eur gurunenn
En neñv e-touez ar verzerien.

Jerzey²⁴

Ton : *La Paimpolaise*

Ma 'teus c'hoant da houd pegen kaer,
Da weled pegement a liviou
E-neus an douar en Bro-Dreger
Pa vez diwan an trevajou
 N'e-teus nemed mond
 'Barz en avion
En eur darnijal, e weli
Piou e-neus kalz a batatez
Hag-eñ eo druz gwiniz Pipi
Hag-eñ eo stank irvin Jakez.

Hirie e-meum lakaet 'n on fenn
Dond d'ober eun dro da Jerzey
'Vid gweled tud an enezenn,
Ober eur vlagadenn gante
 Ha deuz Lannuon
 'Barz eun avion
Eh om nijet 'uz d'ar mor braz.
Hemañ 'nevoa diouaskell kreñv
'Vid on dougen dreist an oabl glaz,
Koulz lared beteg lein an neñv.

Gwelet 'meum er prenest digor
Sant Erwan o tanañ e gorn.
Deuet eo d'ar red da doull an nor
Evid astenn dim-ni e zorn
 Med an avion
 'Zo dalhet da vond.
Nim 'hije on mouchouar godell.
Selled 'ree diouzim o pellaad.
« N'it ket, 'mezañ, da vond re bell.
C'hoant 'm-eus d'anveoud ar strollad. »

Nim 'dremeno c'hoaz eur wech all.
En dro-ze en eur vond d'al loar
Pa gavom ken braz darnijal
E savfom diwar an douar
 Da weled du-hont
 Penaos emañ kont,
Ma zo eno tud o vevañ

²⁴ Jerzey : iskiz eo an titl.

‘Hallfom ober eur veilladeg.
‘Michañs e selaoufont kanañ
Ha kontañ de’ treou brezoneg.

Nijet e oam evel êle’
Da glask eun tammig plijadur.
Kanet e-meum gloar da Zoue
‘N eur weled kaerder an natur.
Deuz an avion
E klevom o son
Kleier skiltr en touriou uhel.
Evned o kanañ war ar skourr
Hed-ha-hed aochou Breiz-Izel,
E welom an dud ‘barz an dour.

Pa hallin ‘vel an alhweder
‘H in d’ober eun dro ‘uz d’an douar.
Ha pa vin galvet gand Sant Per
N’in ket gand an Ankou na gar
Nann en avion
Buan-ha-buan
Me a zavo deuz park braz Servel,
Ha neuze ‘h in du-hont da boz
‘Raog ‘mo bet amzer da vervel,
E vin arru er baradoz.

Ar goañv

'Vid ar bloaz ar goañv n'eo ket brao.
Bemdez e ver distrempet gand ar glao.
Darn a lar ar yenienn eo ar gwasañ.
'Vez ket brao neuze bezañ koz pe glañv.
Nann, med da vihannañ 'n on bro-Dreger
A zo danvez tan pezh a gerer.
Koad a zo da drohañ pe da ziskar
'Vid nebeud a arhant, pep hini pezh a gar.
Kavet 'vez ive peadra da derri naon ha sehed.
Rag-se n'eus ket leh da vezañ re nehet
Na pa vefe eul livadenn erh pe eun tamm fank
Peogwir 'n on bro gaer netra ne vank.
N'arru ket amañ ive aliez a darvoudou braz.
Koulskoude geo en deizioù all e oa sonet ar glas
'Vid degemenn e oa lonket ar lestr Tregor gand ar mor don
Ha d'e heul eun toullad martoloded a galon.
Ya, kouezet e oant en dour skornet, an dud paour,
Hag int c'hoaz en bleuenn o yaouankiz.
Med o ano²⁵ a chomo en lizerennou aour,
Skrivet en kalon o henvroiz.
Ha Sant Per, ar pesketaer koz
E-neus digoret de' dor ar Baradoz.

Darn a lar mond war ar mor 'zo risklañ e vuhe',
Med me 'gred e varvo c'hoaz muioh a dud 'n o gwele.
Daoust da ze pep hini diouzim pa vez noz
'Nevez hast da 'n em astenn 'n e wele ledan pe gloz.
Ya, daoust d'ar mor da vezañ a-wechou treitour
Ze ne harzo ket ar re yaouank da vond etrezeg an dour.
Nann, netra ne harzo martoloded Vreiz-Izel
Da vond da gas ha da gerhad treou d'ar broiou pell.
Netra ne harzo amañ on fesketaerien,
Tud dispont evel Robert Broudig ha Yann Derrien,
A-benn d'ar barriou mor da vond en o bagou
Da glask bevañs mad d'an dud, ormel pe ziliou.
Ya, ar mor glaz a zo kaer ha tentuz
Ha bevañ en bord an aod a zo yahuz.
Kaer 'nevo ar mor kroual, an avel c'hwezañ kreñv,
'Vo ket beuzet an oll dud na diskaret an oll gwe'²⁶.
En deizioù all ar voualh a gano war eur brank.
Ar glao a davo ha ne vo ken a fank.

²⁵ ano : o anoiou.

²⁶ gwe' : gwez. Rima a ra gand "kreñv", distaget "kré".

'N on traouiennou e kano ar goukoug.
Di ive²⁷ eh ouvezo tennañ ar vad euz an droug.
Sonn 'n e zav e chomo ar Breizad kaloneg,
Ha biken ne lezo mougañ ar brezoneg.
Klevet 'vo ar piker-mein 'n e vengleun minerez
Hag ar labourer 'n eur hadañ patatez,
O kanañ : « Peuh d'an dud a boan war an douar
Ha buhez hir d'ar re 'h aio da chom d'ar Loar. »

²⁷ Di ive : bet skrivet "Di ue" er skrid orin moulet.

Plijoud a ra din

Plijoud a ra din dond aliez hirie d'eur veilladeg,
Da weled ma henvroiz, da gleved tud kaloneg
O kontañ hag o kanañ 'n on yez kaer, en brezoneg.

Plijoud a ra din bale en sioulder ar mêziou
D'an diskar-amzer pa vez kouezet an deliou,
Ha d'an nevez-amzer pa vez dispak ar bleuniou.

Plijoud a ra din pa vez tomm diskenn beteg an daonienn
Hag azezañ en disheol dindan eur wezenn
Da zelled deuz ar waz-dour o tiskenn.

Plijoud a ra din diwar an uhel selled a-dreuz hag a-hed
Deuz an treou krouet 'vid ober kaerder ar bed
Ha lared neuze : « Ma Doue 'n ho kalloud me a gred. »

Plijoud a ra din selled deuz ar mor, dous pe fuloret,
Deuz paotred an aod o stignañ o rouejou da dapoud pesked
Ha deuz ar re 'vez o vond en o bag en riskl da vezañ beuzet.

Plijoud a ra din 'tal eur parkad ed-du kleved ar gwenan o son.
Ar lapoused o kanañ pep hini war e don ;
Neuze a varzonij e vez karget ma halon.

Plijoud 'ra din neuze sevel eur werz pe eur gontadenn
Ha pa vez eet an dud da gousked, kemer ma fluenn
Da skrivañ ar poziou a vez diwanet en em fenn.

Plijoud 'ra din d'an abardaez selaou ar hloh o tintal an Añjeluz,
Selled a-uz da Veg-Leger ouz an heol o vond da guz,
Ha kontañ 'barz en oabl ar stered lugernuz.

Plijoud 'ra din kleved ar hleier o vrallañ en touriou.
Kleved du-mañ en iliz Berlewane mouez an ograou
Ha kleved en goueliou Breiz mouez ar vombard hag ar biniou.

Ha da fin an hañv pa welan ar gwennilied o vond adarre d'o bro
E plij din lared de' : « Mond da rei deuz on helou
D'on zoudarded h d'on martoloded a zo er holoniou. »

Plijoud 'ra din gwdeled ar vugale dorn-ha-dorn o vond d'ar skol
Ha goulenn a ran ma vo desket de' da heul ar galleg dreist-oll
Yez on bro, yez on zadou, 'vid na n'aio ket da goll.

Plijoud 'ra din soñjal zo e-leiz a dud en Breiz-Izel
O vale dorn-ha-dorn pe skoazell-ha-skoazell
War-lerh ar re a zo er penn o tougen he banniel.

Ya, plijoud 'ra din soñjal emañ banniel Breiz 'n e zav-sonn
Rag divennet eo bet gand on zoudarded dispont
Ha douget eo bremañ gand tud kreñv, tud a galon.

Ar gannerez koz

'Michañs ho-peus bet klevet komz euz ar gannerez koz
Med ma n'am-eus anveet nemed ar gannerez koz
Hag a welen bemdez o tiskenn beteg ar stank
Dre an hent don leun a dour hag a fank.
Teurel a ree he harrigellad dillad war ar min²⁸
Ha neuze 'h ee en he hased war bennou he daoulin.
Goulennet 'vez pegoulz 'vez an den ar brasañ ?
Pa vez o pedi Doue war bennou e zaoulin dirakañ.
Me 'gred ar gannerez daoubleget a-uz d'an dour
A vez braz ive war bennou he daoulin dirag he labour.
'Pad an deiz dindan an heol pik en-kerz an hañv
Dindan ar glao hag an avel 'kerz ar goañv,
Daoust ma vez gwelet en-mesk an dud pinvig
Na klasket da vond da vond da Vexiko d'ar jeu "olimpik"
Gonezet 'deus, med 'deus ket bet eur vedalenn aour.
Nann, chomet eo 'n he zi bihan 'leh 'deus bevet paour.
O ! laret 'vez : « ar hannerezed war ar stankou
A blij deze dresañ porpañchou. »
Med penaoz e padfent 'pad an deiz da veskañ dour yen
Hep kontañ eun istor bennag an eil d'eben ?
Da hortoz se he-deus digaillet kalz a lostennou
Ha gwalhet o liboud da begement a vugaligou.
Med en dro-mañ setu eet he micher da fall.
Prenet zo eur mekanik da gannañ 'n eur stumm all.
Red eo heuill ar "progre", mond deuz ar hiz,
Ha neuze Marivon gêz a oa arru skuiz.
Ha peleh 'vije kavet eur plah yaouank ?
Da dond evelti da gannañ war ar stank.

Ze zo kaoz a zo dleet dezi a-berz pep hini
Anaoudegez vad ha sikour en he hozni.
Da hortoz ken ma vo galvet gand Sant Per :
« Deut, emezañ, kannerez koz Plouber
Tra-walh a dud ho-peus arru digraostet²⁹
Ha pa 'peus uzet hoh oll vuhez koulz lared
War bennou ho taoulin 'n eur hased da gannañ,
Ho-po bremañ eur gador vourret da azezañ,
Leh 'po ket d'ober fourdouillad ken
Na lichou bervet na dour yen.
Deut, n'eo ekt da gannañ, med da ganañ d'ar Baradoz.
Setu peleh eun devez e kavfom ar gannerez koz.

²⁸ ar min : ar mên.

²⁹ digraostet : digraostennet.

Me 'gar ar bleuniou

Ton : *An durzunell*

Me a gar an oll vleuniou, a beb liou, beb ment,
Hg ar poziou a ziwan heb gouzoud 'n em fenn.
En eur zantoud o c'hwez-vad, 'n eur weled o haerder
Hag ar poz kentañ a Vae 'vid meuli o hrouer.

Meur a wech a-hed an deiz e ran sioul ha didrouz
Eur lamm en em liorzig en gwasked ar bern-plouz
Da lahañ ar loened fall ha da ober eur zell
Betegoud 've eur blantenn o vond gand an avel.

Plijoud a ra din c'hwennad ha temzi an douar
O soñjal kaoud goude bleuniou koant ha dispar,
Ha pa vo gouel an Oll-Zent pe gouel ar Zakramant
E vefont oll kuntuillet ha trohet didamant.

D'ar Werhez em-pad miz Mae e lakean roz gwenn.
Da galon Jezuz roz ruz goude 'pad miz Even.
Plijoud a ra din ive mond bep sul mintin mad
Da guntuill ar reou freskañ da gas war bez ma zad.

Gand ar bleuniou e hellan ober bep seurt impli'.
Mad int da gas d'an iliz, da lakaad 'barz an ti ;
Pa deu tud kêr da vale beteg ma mereuri
E plij din rei de' ive eur vriadig lili.

Plijoud a ra din ive bleuniou ar parkeier.
Ar brug hag ar balan a deu er lanneier ;
Na karoud a ran bevañ en sioulder ar mêziou
O santoud a-hed an deiz c'hwez vad an oll vleuniou.

Diviz etre an dour hag ar gwin

Ar gwin

Penaos e kredez tremen ken lorhuz dre ar ster ?
Ne zoñjez ket pegement eh out eun dra dister ?
Me eo am-eus digarez da gemer eun tamm gloar
Pa 'h on brudet ha karet dre-oll war an douar.

An dour

An drived dezi euz ar bed 'oan krouet gand Doue.
Anavezet ha klasket 'h on gand an oll abaoe ;
Goulaoui 'ran ar lodenn vrasañ euz an douar ;
N'am-eus na ment na muzul, ma nerz a zo dispar.

Ar gwin

Na pa vez³⁰ anavezet, 'vid karet nan³¹ out ket,
Rag te a zo eur muntret : nag a dud 'teus beuzet
E-leh me 'zo didamall, arru mad gand an oll ;
Pegen laouen 'vez an dud pa ven³²-me war an daol.

An dour

Mard eo gwir on eur muntret, te 'zo torfedour.
Nag a dud a zo marvet, n'eo ket euz evañ dour,
Deuz trinkañ re aliez 'deus breinet o skevent
O charread re vraz kargou o-deus torret o fenn.

Ar gwin

Bet o-deve plijadur 'pad ma vent oh evañ.
Gwelet 'vijent o c'hoarzin, o vlagal, o kanañ,
Leh ar re ah a d'ar feunteun da derri o zehed
A chom teñval o fennou, eun druez o gweled.

An dour

Ar re ah a d'ar feunteun o-devez plijadur.
Ne gollont ket o skiant, chom 'reont koant ha fur
E-leh an everien win 'goll o fenn hag o fri
'Deu da vezañ pikotet ha ruz evel sivi.

Ar gwin

Ganin e ranki tevel, kaer az-tevo gwinkal
Ha chom em-pad an amzer 'n ez traouienn da ruillal
'Deui ket da frikotañ ganin-me war ar mêz
Na da di ar vourhizien, lakaet 'vefes er-mêz.

³⁰ vez : vezez

³¹ nan : stumm naha tregerieg.

³² ven : vezan.

An dour

Me 'h ay ganit d'ar hestell koulz ha d'an tier-plouz
Rag red 'vo kad ahanon da walhi an treou louz
Pa ven galvet 'h an-me da zikour lahañ an tan,
Te 'chom 'n ez kourvez er hao ha ne rez ket a van.

Ar gwin

Neuze 'ho heñvel ouzit ma 'h on-me didalve'
'Vez ket a dan da lahañ aliez da hras Doue.
Nag a dud az-teus beuzet, lonket 'teus bet kêriou.
Nag a wech az-teus ive beuzet an trevajou.

An dour

An treou ne diwanfent ket ma rafe 'med sehour,
Nag an dud nag ar loened n'hallont bevañ heb dour.
D'an dud e vagan pesked ha rei ane' 'vid mann,
Ha te 'vevez ket eun den nemed evid arhant.

Ar gwin

C'hoant 'm-eus e vefe hemañ ar hrogad diwezañ.
Kaer 'teus ; ne dislari ket, ahanon er wech-mañ.
Me 'zo kentoh evidout da vihannañ en iliz
Gand ar beleg 'ven lakaet bep beure er halis.

An dour

Me 'ha er halis ive ken aliez ha te,
Hag er zakramañchou all ne vez nemedon-me.
Gand ar gwin nan-eus biskoaz, kaerroh zo na vo ket
Badezet na benniget na greet seurt vad ebed.

**Da Etienne Rivollañ
Pennsoner Boulvriag**

En strollad Beilladegou Treger
E oa braz ar hañvou hag an diouer
Pe e-moam kollet on brasañ soner
 On mignon brasañ
 Etienne Rivollañ.

Deut e oan da Voulvriag en ano ar strollad
Evid diskouel on harantez, on anaoudegez vad
Evel an oll dud an daerou 'n em daoulagad
 Da lared eur bedenn
 Evid ene Etienne.

Rag Etienne a deue ganim-ni da zon
Kazi bep sun du-mañ da-gostez Lannuon,
Ar mousc'hoarz war e zremm, ar joa 'n e galon
 Gand e gamarad feal
 Georges Cadoudal.

D'ar houlz-se er beilladegou e oa ar hiz
Da rei tu d'eur gwaz kreñv da honid eur priz.
An hini a diflipe ar berchenn 'nije eur hog griz
 Henez 'oa ar jeu baz-yod
 Hag a blije da beb aotr³³.

Aze 'vije ³⁴ beh, ar hrog a vije stard.
« Diwallom, emeze, rag aze deuz Boulvriag zo eur hanfard
Pe e vefom adarre diflipet gand paotr ar vombard. »
 Med Etienne 'nevoa nerz ha tu
 Hag ah ee gantañ dustu.

Med allaz, ne oa ket war an douar evid pell ;
Eun devez, ar Werhez he-deus laret da eun êl
Diskenn en eur liorz war vèziou Breiz-Izel
 Da guntuill dezi eur lilienn
 Eur vleuenn wenn.

Neuze e êl mad a oa d'e heul a laras da Etienne :
« Red eo din fenoz arreti ahanout war an hent
Pa 'ho on karget gand Mari da drohañ dezi eur flourdilizenn,
 Eur zunvez e houzañvi da hortoz

³³ aotr : ? aotrou ?

³⁴ 'vije : veze.

Dond ganin d'ar Baradoz.

Te 'zo karet gand an dud, med muioh c'hoaz gand Doue
Hag en-kreiz da yaouankiz pa'h e' e Volonte',
Grez dezañ a galon vad ar sakrifis deuz da vuhe'
An dud a gavo truezuz
Med da zakrifis a vo talvouduz. »

Ma oa truezuz d'an oll, d'e vamm e oa ar gwasañ,
Med bet he-deus feiz a-walh da 'n em rezignañ
'N eur lizer degaset din e skrive ar homzou-mañ :
"Ma mab a bed evidom en neñvou
E-leh ma son c'hoaz ar vombard hag ar biniou".

En koun euz Marharid Fulup

En Pluned zo savet eur mên minerez.
En ano warnañ ha ne 'h aio biken kuit.
Savet eo bet en enor d'eur varzez
Hag a oa heh ano Marharid.

Eur baourez na ouveze na lenn na skrivañ,
Med savet he-deus soniou kaer e-leiz,
Ha 'pad heh amzer he-deus dalhet da ganañ
Gloar ha meuleudi da Vro-Vreiz.

Marharid Fulup 'oa ket eur farodez.
N'he-devoa na c'hoant nag êz da vezañ stipet ;
Bebet he-deus sioul evel eur baourez,
Karet gand he henvroiz, gand tud Pluned.

Mond a ree dre an heñchou fall
Beteg ar chapelioù koz.
Aliez, en peherinaj evid an dud all,
Ha peurviañ he-dije he mennoz.

Ano Marharid ar mên a zo koant ;
Koant 'vije ive douget gand eun dimezell.
Neuze 'ta, ma vije roet, devez o badeziant,
Da verhed bihan Breiz-Izel ?

Ya, ra vezo kalz o tougen heh ano
Hag o kemer skwer war he buhe'
O kanañ a-bouez-penn enor d'o bro
Hag a zo greet ken kaer gand dorn Doue.

Bremañ zo tri-ugent vloaz, a-raog mervel,
Marharid Fulup 'devoa ket soñjet penaoz
'Vijde deut eun den yaouank, 'vel Guz Castel,
Da lakaad enori ha komz euz ar baourez koz.

Med se diskouel a zo e-touez ar yaouankiz
Tud a anaoudegez vad, tud kaloneg,
Tud a ouvezo divenn d'o bro he frankiz
Ha mired d'he bugale ar brezoneg.

Trugarez 'ta da Vorlez Troman, da Guz Castel.
Gras deze eur skeudenn gaer a zo savet,
Ha bremañ pe raio glao, pe raio avel,
Marharid 'vo gwelet 'n he hoazez war blasenn Bluned.

Devez an dornañ

Ton : *Ni ho salud, tud a galon.*

Oll dud an ti zo reuz warne.
Ar wreg a zo war ar bale
Oh ober tan 'raog goulou de'
D'ober soubenn deuz he gwellañ
Pemp warn-ugent 'deus da leinañ.

Mard eo stummet mad an amzer
Eh a en-dro ar heflusker
Ha pep hini 'glask e vicher.
War ar bern ed eh a pevar,
Daou da dostaad, daou da zarbar.

Unan war ar houfr o trohañ
Hag unan all o tispakañ.
Paotr ar mekanik o voueta.
Unan a zo gand ar zeier.
Pevar o kas greun d'ar zolier.

Gand peb a forh koad war o flên,
Oh hijañ plouz 'vez eur reñkenn.
War eur rumm all 'vez muioh tenn
Ar re 'vez o kas plouz er-mêz
De' poan 'n o diouvreh aliez.

Eun den koz 'zo gand ar rastell.
Diou blah yaouank gand an niñsel
En eur hoarzin o kas ar pell.
Eiz pa nao gwaz war ar bern-plouz
O poanial oll-zioul ha didrouz.

Ezomm 'vez heol tomm ha sehour³⁵
Evid ober ar labour.
Neuze deuz an dud e kouez dour
Med pa ra avelaj pe hlao
Bezañ o tornañ 'vez ket brao.

Arabad lezel ar baotred
Da gaoud re, oll, a zehed ;
Diweet 'vefer pa vont mouget,
Da ginnig de' na jistr na gwin

³⁵ sehour : sehor (evid ar rim).

Na da gerhad ar medisin.

Tan a zo en daou benn an ti.
Ar merhed a gemer soursi
D'ober d'an oll meuziou bervi,
Kig fresk a vo gand ar wastell,
Nemed bezañ 'vije vijel.

Eet eo an eost war ar hrignol.
Laouen hag evuruz an oll.
Pep hini 'n-eus bet e zigoll.
Eun tamm gwerz-butun goude koan,
Ha trugarez d'an dud a boan.

Dispenn ar hleuniou

(pe : *remembrement*).

P'oa freuzet kleuniou ar barrouz
Direi tra la la dira la
Kalz a dud o-devoa o-devoa greet trouz,
Evel just d'o hleun 'deus bet keun.

Welloh 'oa da Fañch en eun taol dorn
Direi tra la la dira la
'Vid lezel eünañ eun dro-gorn.
Goud 'ree d'e gleun e-nije keun.

Souz a-dreñv, ma droed 'zo aze
Direi tra la la dira la
Plas ma hleun ne vo ket dit-te
Rag pa laran, d'am hleun 'mo keun.

Ma fark 'zo prest da bikad kaol
Direi tra la la dira la
Ne roin ket 'nezañ da Baol.
Tra-walh 'vo din kad keun d'am hleun.

Rei eur park mad d'eur lah-menaj,
Direi tra la la dira la
Se 'zo tra-walh da goll kouraj.
D'am fark ha d'am hleun me 'mo keun.

'Vid kad diou goz tachenn 'n e blas
Direi tra la la dira la
Douar mad 'med da blantañ chas.
En dro-ze d'am hleun 'mefe keun.

Tapet 'deus Soez he skubellenn
Direi tra la la dira la
Klevet e vije penn-da-benn
O hopal war he hleun hep keun.

Ma stouvit, emezi, din ma stank
Direi tra la la dira la
Me 'skoio 'hanoh 'barz er fank,
Ha goude dreist ar hleun hep keun.

Dizarbennet 'oan bet gand Joz
Direi tra la la dira la

P'oan eet da vuzuri he hloz,
Rag Joz d'he hleun he-devoa keun.

Ola, emezi, souzit a-dreñv
Direi tra la la dira la
'Vo ket diskaret din ma gwe'³⁶
D'am gwez 'vel d'am hleun 'mefe keun.

Ma gwez-avalou, 'me Vatist,
Direi tra la la dira la
Pa n'hallan ket bevañ heb jistr,
D'am gwez e varvfen-me gand keun.

'Velkent re a "chambardement"
Direi tra la la dira la
Gand paotred ar "remembrement".
Ha me d'am hleun, me am-o keun.

A blasou zo bet jabadao.
Direi tra la la dira la
Beteg sach-bleo ha taoliou pao.
'Vel just d'o hleun o-devoa keun.

Darn a oa o stourm, darn o sikour.
Direi tra la la dira la
Setu eet ar hleuniou en dour.
Bremañ d'am hleun me am-o keun.

Bravoh 'oant 'vid an orjalenn
Direi tra la la dira la
'Zo bremañ etre pep tachenn.
Setu d'am hleun, me am-eus keun.

'Tal ar hleun goude ar pardon
Direi tra la la dira la
'Reen eun tamm kaoz gand ma mignon.
Med kleun 'bed ken, bremañ 'vez yen.

Er blênenn zo plas da fringal
Direi tra la la dira la
Pell-tre ar penn hag ar penn all.
O ya, d'am hleun, me am-eus keun.

War ma hleun hir 'tre ma farkou,

³⁶ gwe' : rima a ra gand "a-dreñv" a vez distaget "a-dre".

Direi tra la la dira la
Me 'blijje din kuntuill bleuniou.
Bremañ d'am hleun, me am-eus keun.

Ma zaout pa deue eur barr-glao.
Direi tra la la dira la
Mond kostez ar hleun e kavent brao.
Bremañ d'ar hleun, ar zaout 'deus keun.

Tud ha loened pa ree avel
Direi tra la la dira la
Bremañ eh eont e gwasked ar hleun uhel.
Setu d'ar hleun zo kalz a geun.

War ar hleun 'barz ar boujennou³⁷
Direi tra la la dira la
Ar vugale 'glaske nejou³⁸.
Bremañ d'ar hleun 'vel juts, 'deus keun.

War ma hleun 'oa eur wezenn graou³⁹.
Direi tra la la dira la
D'he heul ive eo eet en traou⁴⁰.
O ya, d'ar hleun, an oll 'deus keun.

Kaer zo bezañ freuzet kleuniou
Direi tra la la dira la
Zo c'hoaz troiou-korn, beskellou.
Ha pep hini d'e gleun, 'n-eus keun.

Goude ar hrog 'meum bet eur hras
Direi tra la la dira la
Ar barrouz 'zo chomet 'n he flas
Hag achu kañvou ar hleuniou.

Hag an dud 'zo kamaradou
Direi tra la la dira la
Sklêrroh 'welont heb o hleuniou.
Diweet 'h on gad keun d'am hleun.

³⁷ ar boujennou : ar bodennou.

³⁸ nejou : neiziu.

³⁹ eur wezenn graou : eur wezenn graoñ.

⁴⁰ en traou : en traoñ.

Dastumet eo an est⁴¹

Ton : *Me 'zo kristen.*

Arru eo ar zadorn da noz,
Peurdastumet ganim an est.
Ar hoaz e vo gallet renoz,
Ha kanañ meuleudi d'ar mestr.

Setu o tond ar garg diwezañ.
Gand eur bod glaz stignet war an heiz
'Vid diskouel zo fin da beurglozañ
Ar gwiniz, ar herh hag an heiz.

Bemdez eh eo bet brao an amzer
Evid trohañ ha charread.
Êzet eh eo bet d'ar labourer,
Dastum e drevad en stad vad.

D'on tad Adam ha d'on mamm Eva
Doue a lavaras gwechall :
« C'hwi 'ranko gonid ho para
Gand ar hwezenn dimeuz ho tal. »

Ar lezenn-ze n'eo ket bet cheñchet.
Wasoh 'vid biskoaz, 'vid ar bla⁴²,
Ar labourerien o-deus c'hwezet
O tastum an danvez bara.

Med setu-int dija dihaouet.
Ha 'n o foaniou 'zoñjont nemeur
Rag plijadur o-deus o selled
Deuz ar berniou ed war o leur.

Hag o weled madelez Doue
Deuz kalon an den anaoudeg
E sav eun akt a wir garante'
Beteg tron an Ollhalloudeg.

Med c'hoaz zo poan da gad gantañ.
Hag eur hras a chom da houlenn.
Ma vo heol tomm evid an dornañ,
Evid dornañ ar gwiniz melen.

⁴¹ an est : an eost.

⁴² ar bla : ar bloaz.

Neuze ar labourer e-nevo
Danvez da ober bara gwenn
'Vid sikour magañ tud ar hêriou,
Ar zoudarded hag ar beorien.

Gand ar gwiniz-se 'vo greet ive
An osti gwenn teir gwech santel.
An osti a viro on ene
Evid ar vuhez eternel.

An hader patatez

Pa oan ganet e oa roet din eur skudellad patatez ha lêz
'N eur lared din : « Debr, hennez eo bevañs an dud diwar ar mêz
Ha ma 'teus c'hoant da zerhen da gaoud patatez da vevañ
E vo red dit abred modn da zikour hadañ. »
Me, eme ma zad, a desko dit penaoz hadañ patatez :
Da gentañ : etre pep tamm, e lakai hed da votez.
Ha setu-me eun devez da vond da glask fred
Da gostez Louaneg, bro ar patatez abred,
'N eur lared : Me 'raio diou lodenn : aze avad emañ an taol.
Ya, eun hanter lodenn er park hag eur lodenn hanter ouz an daol.
Sell 'ta, eme an dud, koz pikouz fall,
Kerz pelloh da glask labour e leh all.
E oan o vond pa arruas a-benn din an Aotrou Mêr :
Deus du-mañ, emezañ, hag e vi bevet mad ha paeet kaer ;
Me 'm-eus ezomm tud, rag krog eo ar labour vraz.
Hañ ! ya, eno 'oa eun diframm seurt 'm-eus gwelet biskoaz.
War ar zolier 'oa eun dousenn gwrahed koz
O traillañ patatez adaleg ar beure beteg noz.
Ha c'hoaz 'vez laret ne ra ket Doue ken a vurzudou ?
Geo, me 'gred, pa ro patatez 'n o fez diwar dammou.
O tostaad kasedadou de' e oa pemp pe hweh mous,
Hga o kas d'ar park nao pe deg marmouz.
Tri pe bevar gwaz gand peb a drakteur oh ober roudennou.
Kemend-all o sklabezi 'no⁴³ leiz a wano⁴⁴.
Ar park 'oa hir ; er hreiz 'oa eur varrikenn win.
Pep hini ah ee da evañ gand eur chopin.
Pa 'm-oa evet eur sklopad ha me da hadañ patatez
Ha da lakaad en-kreiz tre bep tamm hed ma botez
Ken oa manet digor o genou da zelled ouzin
'Oa ket unan en Louaneg kap da hoari ganin.
Hañ ! hemañ, emeze, a oar ped eur 'vez pa zon ar hreiste'.
Ya ! 'mon-me, unneg eur hanter sonet, eun hanter eur "ave".
Deut 'oan da vezañ paotr yaouank ha tapet ar vrud
Da vezañ eun den dorniet mad, ar hentañ euz an dud.
Arru 'oan zoken war ar poent da zimezi d'eur bennherez.
Ne oa ken etrezom nemed hed ma botez.
Med eun devez 'm-oa kaset ar harr war ma hein,
Darbet 'oa din bezañ lahet a daoliou mein.
Pa oa koñvers ar patatez o vond da zigeri,
E oa laret din eur beurevez gand mestr an ti :

⁴³no : enno

⁴⁴leiz a wano : gwano : temz.

Hast buan, emezañ, mond beteg ti ar marhadour
Da gerhad seier ha da gleved ar hour.
Pevar mil lur, emezañ, *les cent kilos*.
Me am-eus komprenet : pevar mil lur ar hant *en gros*
Ha me da hopal ha da gas ar gaoz :
Pevar mil lur ar hant patatez en Perroz ;
Ma 'pije gwelet nag a diframm hag a reuz
Paotred Louaneg da dennañ o fatatez toud a-dreuz.
Hañ ! emeze, *Vive Monsieur le député*.

En dro-mañ 'h eom d'ober on fortun,
Ha te, paotr mad, az-to eun tamm mad a werz-butun.
Med allaz ! pa oa gwelet oh arruoud e-leiz a beziou kargou,
Ar marhadour da rei eun taol telefon : Alo ! alo !
Pemzeg-kant lur ar hant patatez.
Ma 'h int ken groz hag ho potez.
O ! emezon, en dro-mañ eo torret pod ar hoavenn.
Me 'h a da vezañ lahet gand ar charreterien.
O ! ya, greet o-dije stripou ouz ar paotr
Paneverd 'm-oa gallet lampad en aod,
Hag abaoe 'm-eus ket kredet mond da gad du-hont.
Med ingal zo, tapet 'm-eus ar vrud en kostez Lannuon
Da vezañ ar hog da hadañ patatez
O vezañ ma lakean etre bep tamm hed ma botez.

Me 'breno kêr Lannuon

Ton : *An durzunell.*

En traou miñs Berlewane e-leh ma'h on ganet.

En traou miñs Berlewane e-leh ma'h on ganet.
Me a vije o c'hoari 'n em liorzic gwasket,
Leh ma welen o tremen touristed a-gantchou
'Vond 'n eur zelled en-dro de' da skreh ar skalierou.

Eun deiz, bihan e oan c'hoaz, e soñjis ken dineh,
Mond war o lerh 'barz ar viñs, krapad beteg ar skreh ;
Kavet am-oa stard sevel n'ouzon ket ped pazenn,
Med abaoe em-eus kontet kant diou ha daou-ugent.

'N em ankouaet 'oan da zelaou ar hleier braz o son
Ha da zelled pegen kaer e oa kêr Lannuon.
Hag o weled he haerder e oa deut din eur c'hoant :
E-leh prenañ bonbonou, mired ma oll arhant.

A-benn 'mo bet ma houignaoua digand ma mêronez
E vin barreg da brenañ kêr Lannuon a-bez.
Hag ahann deuz skreh ar viñs, me 'raio ar lezenn.
Gweled 'rin da gad peleh eh ay ma mererien.

Me a zavo eun ti koant amañ war an uhel
Hag en deiz evel en noz e welin tost ha pell ;
Amañ en gwasked an tour e vo brao din bevañ.
'Vo ket red din labourad, netra nemed heoliañ.

Mad allaz ! kêr Lannuon 'dadh bemdez da greski.
Ha 'gredan ket mond da houlenn pegement 'koustfe din ;
Tremenet 'mo ma buhez hep prenañ peadra.
'Vel-se ma huñvreou kaer a vo eet da netra.

Deuz ma labour 'mo bevet, ha pa garo Doue,
Me a laro kenavo da viñs Berlewane ;
Eur zell a rin deuz an tour hag e peuh e varvin ;
'Vin ket nehet gand kêr Lannuon, peogwir ne vo ket din.

Son ar veilladeg

Ton : *La Paimpolaise*.

En bro Lannuon 'mañ ar gaoz
E vo savet eur veilladeg
En Rospez eur zadorn da noz.
 An dud a hoarzo
 Plijadur a vo.
Kalz a stad 'zo en dud noajet,
Med reou yaouank diwar ar mêz
A gred lared : nim n'efom ket
Pa ne gomprenom ket ar yez.

Neuze ma ne gomprenit ket
Eg oh Breiziz gwall divalao.
Da betra n'hoh-eus ket desket
Da heul ar galleg, yez ho pro ?
 Ho mamm hag ho tad
 He haoze ervad.
Muioh dilu int evidoh.
C'hwi, ho kwerzañ n'eo ket diêz.
N'eus forz peleh eo êzetoh
D'an neb a oar ouspenn eur yez.

Pipi 'oa o lared da Feñch :
Pell 'zo 'kleje bezañ greet
Eur gouel 'vel-henn, kement ha cheñch
'Vid dihuni ar Vretoned,
Tud dispont ha kreñv
 'Zouzont ket a-dreñv
 'Soñj az-teus em-pad ar brezel
'Vijem dalhmad er penn a-raog.
Ya, nim, soudarded Vreiz-Izel
Dre ma'h om, paored, mad d'ar hrog.

N'eus ket evel tud an Arvor
A lar tad-koz e-tal an tan ;
Emañ o kontañ o istor
En eur lared d'e vab-bihan :
 Te 'vo kaloneg
 Hag en brezoneg,
Ma'h ez 'veldon da vartolod,
Dre oll, te a veulo da vro.
Hag aliez war ribl an aod,
E kani "Bro goz ma zadou".

Pa zon ar binou, ar vombard,
Eme an dud : deom da Rospez.
Eno 'vo pres, an treou 'vo stard.
Ha betegoud 'chomfem er-mêz
 Eo well dim kerzañ
 Buannañ 'r gwellañ ;
Ar re goz 'vid trohañ berroh
'Zo deut a-dreuz dreist ar hleuniou ;
Ar re yaouank 'zo deut kentoh
War varh-houarn pe en moto.

Unan 'zo kouezet en stank Per.
Daou all 'zo ruillet en toufle' ;
'R re-mañ o klask trohañ re verr
'Zo lampet an eil dreist egile :
 Emaint o hopal
 Hag o 'n em damall :
Tde a zo kaoz, heb goulou ru',
Sell, 'h ez da gaoud eun taol dorn ;
Te, 'me egile, 'oas ket 'n ez tu
Pa oas oh ober an dro-gorn.

Evel-se e oa tud e-leiz ;
Tud hag a gomze kreñv heb mez.
N'eo ket maro mignoned Vreiz.
An dud a gan en he yez.
 Gloar da Vreiz-Izel
 Bro gaer o havell ;
Da zelaou ar han hag ar zon
'Zo deut leun a dud kaloneg.
Ha setu en bro Lannuon
Savet ar gentañ veilladeg.

Evid Beilladeg Ropsez, e 1959.

Bloavez mad

Greet meum adarre eur gammed war a-raog ;
Eet om er bloaz nevez, eur bloavez all a zo krog.
Setu perag, en ano ar strollad
E teuan da zoueti deoh eur bloavez mad,
Deoh-c'hwi oll, Bretoned kaloneg
Hag a zo deut amañ evid kleved brezoneg ;
E souetan eur bloavez evuruz, kaoud yehed,
Peuh, hag amzer da vond beb noz 'n ho kwele,
Nerz ha kalon da zével en deiz-war-lerh ar beure,
D'an dud 'deus ket amzer da chom en-tal an tan
Ma hallfont tremen ar goañv heb ober re a van.
Bloavez mad d'ar paour koulz ha d'ar pinvidig
Ma hammfont pa garfont debri pesked pe gig.
Heb rankoud da honid d'ar medisin na d'an apotiker,
Med da halloud plasañ kalz a arhant en ti ar fornier.
Heti a ran c'hoaz d'ar re a blij de' eur bannah treo',
Nerz d'arreti da evañ a-raog ma vont mezo,
Rag daoust ma zo gand jistr leiz ar barrikennou
'Vo arabad evañ beetg ruillal en toufleziou.
Bloavez mad d'ar vugale ma refont tud fur ha kreñv,
Danvez soudarded, sent evid an neñv.
Ma vo desket de' er skol da heul ar galleg
Kaozeal, lenn ha skrivañ brezoneg.
Bloavez mad d'an tadou-koz, d'an dontoned,
Ma hallfont diskuizañ, fumi eur hornedad.
Bloavez mad d'ar mammou-koz ha d'ar mammou-kaer,
Ma kavfont en ti o bugale ar gwellañ degemer.
C'hoant 'mije da heti d'an dud koz yaouankaad,
Ha gand an nevez-amzer bezañ gwelet ive o nevesaad.
'Vid ar bloaz 'ver oh ober eun dra zouezuz en on bro :
Oh eafsi pe o 'n em dizober euz ar zeroiou.
Efasi daou zero 'vid ober pevar real gand kant lur.
Me 'gred e rafe d'an dud koz ive plijadur
Ma vije efaset eur zero d'ar re 'zo pevar-ugent vloaz,
E vefe greet gante bugale ezi vloaz.
Soñjit 'ta ! en noad da vond d'ar skol, d'ar hatekiz,
Ha goude d'ar pardonioù da heul ar yaouankiz.
Ar yaouankiz nevez-se avad a heuillfe Breiz.
Neuze 've gallet ober beilladegou e-leiz.
Bremañ avad, emeze, pa om skañv ha dishual,
Nim ah a da ganañ ha da zañsal.
Esperañs 'm-eus da vloaz 'vo greet an taol
Mestr ar beilladegou 'zo eet da houlenn digand De Gaulle.
Med allaz, kaer 'vo astenn e vuhez d'an den,

Eun devez 'ranko lared : n'on ket kad da vond ken.
Soueti 'ran neuze da bep hini pa vo e dro
Kad amzer d'ober e goñchou, da lared kenavo
D'an hini 'nevo dle amzer d'o faeañ,
D'an hini 'nevo arhant, amzer d'o foetañ.
Ma vo ket re a drouz etre an heritourien,
Ha ma lavarfont evitañ eur bedenn
'Vid ma vo lakaet war eun tron 'vel eur roue
En Baradoz an Aotrou Doue.

Ar galvoder

Me, ma zud vad, 'zo ganet dindan eur steredenn fall.
An Aotrou Doue 'n-eus ket greet 'hanon evel an dud all ;
Ma horzaillenn a zo frankoh, ma hov a zo donnoh,
Ma skiant berroh, ma houraj kalz bihannoh ;
Bezañ 'h on eun den hag en-deus kalz a vrud.
Anavezet gand kalz, med karet gand nebeud a dud.
Petra ! arru eo ar lankon-mañ amañ adarre ?
Setu aze petra 'mez da gleved bemde' ;
Ma karjes labourad, emeze, laer didalvez
Deuz da zav 'talvezvez muioh evid deuz da hourvez.

Ya, ma houraj da labourad a zo bihan, siwaz !
Med ma houraj da laerez a zo bihannoh c'hoaz.
Lonkañ ha kemer a ran ar pezh 'vo roet din ;
A-hend-all diwar goust den n'a netra ganin.
Tremen hep paeañ ma gle koz avad a ran
Ha lezel ma gle nevez da gozañ.
Aliez e kouskan war benn pe dindan ar pont
Kuit da baeañ gourmikêl na *contribution*.
Eun devez koulskoude eh in da chom d'am feadra
Rag bezañ 'mo eun tamm douar evid netra ;
Ya, eur park bihan karre, unan heb beskellou
En traou ar vered en-kichenn barrier an Ankou.
O ! Me 'zo mad din bezañ lakaet da vervel forz peleh,
Pa deu ar red⁴⁵, tremen heb mervel neb leh.
Na pa varvfen ket, c'hwi 'gav deoh me 'ray gwad fall ?
Anduret 'vin er bed-mañ ma ven anduret er bed all.

Ha peadra 'm-eus, sur, da vevañ em-pad ma buhe'
Rag, gwech an amzer, e varv unan bennag er hontre,
Ha pa glevan an taoliou o son glas en iliz
Eh an d'an ti war zin lared eun *De profundis*.
O ! 'mon-me, n'eus ket a justis war an douar-mañ :
Ar reou vad a 'h a kuit, hag ar reou fall a chom amañ.
Te, emeze, a gaoze evel eur levr, tosta war greh ;
Karget 'vez din ma hov ha lakeet eur bakadenn dindan ma breh.
En deiz all em-oa heritet d'eun aotrou pinvidig ;
Bet em-oa evel ma welit eur porpant lost-pig,
Eur gamizolenn stamm, hag eun tog foñs-uhel.
Med allaz, an tog a oa eet diwar ma fenn gand an avel.

Deh neuze 'oa deut eur goz dimezell deuz Lannuon

⁴⁵ Pa deu ar red : ma'z eo red.

Da êsaad ober din-me eun tamm sarmon.
Comment ? Vous allez vous marier en tenue de pie ?
Mais vos autres pièces ne sont pas assorties !
Petra ?, 'mon-me, med geo avad, j'ai un faux-col coin cassé.
Ha, da heul se, *pour complément des godasses défoncées.*
Mon tog-plouz avad, j'ai trouvé dans karr an ordures ;
'Velkent, ça marche ensemble tout ça.
Ha neuze, *le bonhomme ne se mariage pas.*
Da biou ? pa ne zell plah yaouank ebed ouzin ;
Kentoh evel ar grennarded e skoont mein ganin.
Ya ! me 'mez aliesoh a daol mein evid a zigaretenn.
Med da hortoz se eo arru seh ma horzaillenn
Ha pa n'eus gwenneg ebed 'n em godeliou
E vin bountet er-mêz deuz an ostaleriou.
Ha me gand sehed n'on ket evid derhen da vond.
Petra 'rin neuze ? Mond da evañ eur bannah war ho kont !

1965.

Paotr ar zoup

Me a zo eun tamm paotr gogez.
Ganet eh on 'barz en traou don
Harp deuz koz kastell ar Vodez
En gwasked koad ar Rumdenton,
Hag eno 'h on savet gand soup
Ha greet aliez *doup-ha-doup doup-ha-doup*.

Pa oa lakaet din ma chut
Me am-oa taolet 'nezañ kuit.
Neuze ma mamm a laras : zut !
N'onn ket petra a rin-me dit.
Ro din, 'mezon, eur skuillad soup
Ha goude ma ray *doup-ha-doup doup-ha-doup*

Pa ne chomen ket 'n em havell
E oan taolet en foñs ar pres.
Ahane 'oan eet er bank-tosell,
Hag eno em-oa greet ma êz
Leh ma talhen da zebri soup
Ha d'ober *doup-ha-doup doup-ha-doup*

Me 'oa eun tamm pikouz fall.
Pa gane ar hog war e glud
Me a groge da werouzal,
Ha kerkent e ranke ma zud
Sevel da dommañ din ma zoup
Abalamour din d'ober *doup-ha-doup doup-ha-doup*

Abred 'm-oa soñjet er merhed.
'N em gad 'oa dizoursi ar paotr.
Da bardon ar Gêr-Wenn e oa eet.
Sell ! eme an dud, ar hov-yod.
N'on ket kov-yod kentoh kov-soup.
Eur hov hag a ra *doup-ha-doup doup-ha-doup*

'M-oa ket tapet deski dañsal.
Koulskoude 'm-oa kavet eur zukenn.
Ne oa ket eur plah troet fall.
Med, hervez, eur liperez koavenn
Mad da wreg d'eun debrer soup
Da unan hag a raje *doup-ha-doup doup-ha-doup*

Deus, 'mezi, da gas 'hanon d'ar gêr.
Marteze e vi arru mad.

Me 'oa nehet ha tapet berr
Rag doan em-oa dirag he zad.
Ne oan ket sur da gaoud ma zoup
Med kentoh d'ober *doup-ha-doup doup-ha-doup*

Geo, laret 'oa din chom da zebri,
Da dañva ar zoubenn ar rouz.
Med keid ma oant-int o vlagi
'M-oa c'hoariet deze eun dro louz.
Me am-oa debret toud ar zoup
Ha mond d'ar gêr d'ober *doup-ha-doup doup-ha-doup*.

Kemeret 'oan evid eur porhell
Ha bet em-oa taoliou loa-bod⁴⁶
Digand ar vamm hag an dimezell
Ken em-oa greet pemep pe hweh chiboud.
Desket 'oa din debri soup
Ha mond d'ar gêr d'ober *doup-ha-doup doup-ha-doup*

Honnez 'oa bet din eun dro heg,
Ha bremañ 'h on tapet divalo
Rag biken ne gavin eur wreg
Pa n'a ken ma hov 'n em bragou
O vezañ 'm-eus debret re a zoup
Ha dalhet d'ober *doup-ha-doup doup-ha-doup*.

⁴⁶ loa-bod : bet skrivet "loa-boud" er skrid orin evid rima gand "chiboud".

Tomm ha yen

Me, ma zud vad, a zo eur paour-kêz den
A zo laret din 'm-eus tapet tomm ha yen.
N'on ket avad nehet gand ma feadra.
Warnon n'eus ket kalz a grog an T.V.A..
Med pourset on, harzal 'ran 'vel eur hi,
Suhellad hep paouez eur vihienn em fri ;
Ken 'm-oa arru mez o vond en-mesk an dud
Rag goud a reen em-oa tapet ar vrud
Da vezañ poah ma skevent, prest da lonkañ ma bouchon.
Henez, emeze, a zo o tizehañ eur poumon.
Ola ! 'mon-me, ne lezin ket ma foumon da zizehañ
Pa ouzon peleh zo treou da hlebiañ.
Ha me da lonkañ, med 'vel a gomprenet⁴⁷
Ne lonken ket a dour benniget.
Setu 'oan o vond da foeltri 'benn ar fin
Ken 'm-oa ranket mond da gad ar medisin.
A ! c'hwi, emezañ, paour-kêz den,
Ho-peus tapet tomm ha yen.
'N em dromplañ rit, 'mon-me, doktor Gwillom.
Me 'gred 'm-eus tapet kentoh yen ha tomm ;
Deuz ar beureou pa zavan
Me 'gav yen ken a grenan,
Ha ma labourfen, marteze 'vefen arru fall ;
Henez, emeze, zo red dezañ kemer plas eun all ?
Neuze 'h an da glask ar gwasked d'an ostaleri
'Ne eur garzañ ma goug da zevel ma fri.
Arruoud a ra eno Jakez, Per ha Paol,
Hag e vez laret din : Tosta ive d'an daol ;
'Vel-se ma tapan yen o tond er-mêz ma gwele,
Eno e vez tommet din a-benn kreiste'.
Hag a-dal ar boan mond kuit da gad medisined,
Pa 'n em dromplont euz an hanter gand ma hleñved ?
Gand ar boeson, emezañ, it goustadig.
Ya, 'mon-me, betegoud e tapfen an hik ;
Memestra, lezit 'hanon da evañ eur bannah treo'
Peogwir n'on ket eur gwall-baotr pa ven mezo.
Ha neuze n'hallan ket lezel ma foumon da zizehañ
Keid ma vo gwerzet treou da hlebiañ.
Petar oh-c'hwi o lared du-hont ?
Mond war ma fenn en riñvier Lannuon ?
Me n'on ket o houlenn ped eur eo diganit
Ha n'on ket o vond da 'n em veuzi 'balamour dit.

⁴⁷ a gomprenet : stumm Treger, bet miret evid ar rim. "a gomprenit".

Med avad da gad medisined n'in ket ken
Pa n'ouzont pe 'm-eus tapet yen pe domm, tomm pe yen.
Nann, me 'zo c'hoaz eur paotr plomm.
N'am-eus tapet biskoaz med yen ha tomm.

Ma zarmon, devez ar pardon

E oan o vond etrezeg ar gêr,
Pres warnon rag me 'vez berr ma amzer,
P'am-eus klevet amañ strakadeg daouarn
Ken ma sone ma dioukouarn.
Ha tud e-leiz o c'hoarzin en brezoneg.
Hañ ! amañ, 'mon-me, e kle bezañ eur veilladeg.
Red eo din mond da weled.
Kaer bezañ skuiz ha foulet
Da lared d'ar strollad dond c'hoaz d'am bro
Rag me a blij din hag abaoe pell a zo
'N en gaoud evel-henn e-touez eun torkad Bretoned,
Tud a galon vad med pennou kaled ;
Ma flijadur 'vez ober gante eur gaozeadenn
Peogwir n'on ket evid kanañ de' eur ganaouenn
Betegoud ne vefe ket staget mad ar zaout.
Rag ma mouez a zon evel eur hloh faout.
Klevet 'peus petra 'oa greet din devez ar pardon ?
E oa greet din tevel gand an Aotrou Person.
Evel just o vezañ ma oa pardon ar gêr,
'Oan 'n em lakaet da zach war gantik Sant Per.
Hañ ! serr da henou, emezañ, gand da vouez kleuz.
Lakaad a rez an dud all da vond a-dreuz.
Hañ ! 'mon-me, 'oa ket bet laret kemend-all din c'hoaz.
Ma lezit ket 'hanon da ganañ, 'douginn ket ive ar groaz !
Nann avad, red eo din lared dit, eme an Aotrou Person,
'Vefe welloh din gweled 'hanout oh ober ar zarmon.
O Doue ! 'm-eus ket amzer da zoñjal petra 'm-eus da lared !
Geo, geo, emezañ, ro de' eun toullad aliou mesket.
Feiz ! kleo, setu-me o vond er gador hag o lared evel-henn :
P'emañ hirie ar pardon, lakait ar peb gwellañ er zoubenn ;
Deut emberr d'ar prosesion ha goude d'an dañsou.
Arhoaz e vo redadeg er zah ha konkour boulou :
Roit ho prof da zant patron an iliz,
Med mirit ive tra-walh da vond da weled an ostiz.
E-leh komz d'an dud all deuz ma gle,
It c'hwi da gentañ da baeañ ho re ;
Kemerit skwer war ho patron Sant Per.
Na lezit ket hoh arhant nag hoh alhweziou er gêr.
Pedit ma'h aio ar moh lard war greh ;
Me 'vo neuze muioh didamall ha muioh dineh.
Tra-walh, tra-walh, eme ar person, na larez ket ken
Rag mond a rez euz an eil kaoz d'eben.
Arsa ! med laret 'poa din rei d'an dud aliou mesket.
'Hanta, ya, n'az-teus nemed brezoneg hag ar re n'ouzont ket.

Ar re n'ouzont ket n'o-deus nemed dond ganin da zeski
Kentoh 'vid lezel ar galleg da vougañ ar brezoeneg 'n e di.
Mad eo deski galleg ha me a oar eun tamm
Med n'esu ket 'vel ar yez desket war varlenn ar vamm.
Er yez kaer-ze o-deus bet blaget on zadou,
Goulennet rabat ha chipotet er foariou.
Hag eur paotr yaouank pa houlenno eur plah da zimezi
Ma houlenno en brezoneg 'nevo respont vad diganti.
Med, med... Krog oh da lared ne ran ket a wad fall ;
War ze neuze 'h an da dehel ha da rei ma flas d'eun all.

Me 'm-eus tapet nao lamp

1

Pa oan ganet, me 'oa eun tamm paotr serz,
Hir ma bleo, ront ma chouk, leun a nerz.
'Benn 'oan c'hweh miz, me dija a vatee plên.
'Oa ket berroh an eil garr din evid eben.
Ha ma'h on bremañ brevet ha jilgamm
Eh eo o vezañ 'm-eus tapet nao lamp.

2

Eun devez, evid dilaoui din ma fenn,
Ma mamm a dapas 'hanon war he barlenn,
Med 'benn neuze, me 'oa eun tamm sah-c'hwez.
Me, 'mon-me, 'chomin ket amañ gand ar vez.
Ha me da 'n em difretañ war barlenn ma mamm
Ken oan kouezet en traou ha tapet eur lamp.

3

Me 'veze klañv gand an naon pa oan er gêr ;
Laret oa em-oa eur vuzugenn, eur preñv "soliter".
War ar plankenn bara em-oa gwelet eur pez torz ;
Na pa dorrfe ma goug, 'mon-me, 'ran ket a forz,
Ma 'h a da grapad ha da dapoud eun tamm ;
Setu torret ganin ar plankenn ha tapet eur lamp.

4

'Benn oan krennard, e oan inosant-rik ;
Mond 'reen forz pegen uhel 'vid dilojañ eun neiz pig.
Eun devez, 'oa dichonket ganin ar brank,
Kouezet 'n em hoazez en-kreiz eur poullad fank.
Difoñset ma bragou ha torret ma garr en daou damm ;
En dro-ze 'm-oa gouvezet petra 'oa kaoud eur lamp.

5

Pa oan paotr yaouank, 'oan spontuz gand an dañsou ;
Degas a reen ar merhed en-dro evel tompiou.
Da bardon Kervaria 'm-oa laret da Janig : mar plij,
Deus ma'h efom on-daou d'ober skotich.
Med eno 'oan dirapet. Ar zal siret 'oa ramp ;
Kouezet Janig ha me ; en-dro-ze 'm-oa tapet daou lamp.

6

Galloud rit kredi : me 'oa bet annoazet
Ha Janig 'devoa mez ha bet gloazet.
Setu-me da gas anezi d'ar gêr a-bouez he breh

Hag 'n eur arruoud en ti e skarzas war-eün d'ar skreh.
Me, o soñjal goulenn iskuz diganti, o vond war he lerh d'ar gambr.
Deuz kreh ar viñs e roas din eun taol-bount seurt 'm-oa bet eur lamp.

7

Eur wech all 'oan eet d'ar hours⁴⁸ kezeg da Lomikael ;
'N em gavet 'oan 'dreg an tribun ; ahane 'welen ket pell.
Hañ ! amañ avad, 'mon-me, eh on tapet fall.
Med me 'oar deuz peleh e welin dreist an dud all :
Me 'h a da grapad war ar rohell vraz en Sant-Eflamm.
Ma ! med deut 'oan a-ruill en traou ha tapet eur lamp.

8

Er zul war-lerh, 'm-oa soñjet mond d'ar hourenadeg
Da Venah, Belle-Isle-en-Terre en galleg.
Eno, 'mon-me, 'vez gwerzed, med sur ne gavin ket ma far.
Rag 'hit da weled, amañ zo "biceps" ha kov-garr.
O krohenn ma haz ! didroadet 'oan bet gand Gwill an Turham.
Klak, war lein ma hein, bet ma lamp.

9

War-lerh kement-se, 'michañs, 'vefet ket souezet
O weled 'hanon o teurkañ hag o jilgammad.
Med, kredit 'hanon, pa laran, me 'zo bet eün,
Hag em-eus c'hoariet troiou na vijent ket eün.
Ha c'hoaz, 'm-eus ket kredet komz deoh deuz ma gwasañ lamp,
Deuz an hini 'm-oa bet o kouezañ diwar ma fod-kambr.

Ya, med deut 'oan a-ruill en traou ha tapet eur lamp.

⁴⁸ d'ar hours : galleg. d'ar redadeg

Treuzi kêr Lannuon

Ma 'peus c'hoant d'ober eun dro buon-ha-buon⁴⁹,
N'it ket da êsaad treuzi kêr Lannuon.
Me 'm-oa da vond en deiz all deuz Lokemo da Dregastell,
Ha, me 'lar deoh, me 'garje 'mije bet diouaskell !
Med, pa n'em-eus ket em-oa ranket kemer ma "Braek",
Ha, me 'zo sur deoh e oan bet tapet koeg !
Eur rengenn gweturiou adaleg Beg-ar-Lann beteg ar post
Evel ma vez laret, oh ober lost.
'Oan ket kap da drei na da vond da gad neb leh.
Gwech an amzer eh avañsen keit zo ahann deh ;
Kaer em-oa kornial, sachañ ha bountañ,
Ne oan ket evid 'n em dizahañ.
Eur C.R.S., digor e ziouvreh en pep korn ru,
Oh êsaad lakaad an dud da zerhen o zu.
Goude, 'gaven ket eun toull da boz ma gwetur en kêr ;
Red skei 'nezi er riñvier pe adkas 'nezi d'ar gêr.
Kad 'reen hir an amzer, ne oan ket dineh ;
Selled 'reen aliez deuz ma moñtr war ma breh.
Deg eur, unneg eur, kreisteiz nemed deg,
Serret ar finañs, 'mo ket gallet kaoud ma chek⁵⁰ !
A-wechou 'meze eun domnderenn, a-wechou 'meze riou,
Dirag ar post o hortoz ar goulouiou da cheñch liou !
Chaous ! 'mon-me, me 'h a da vond en-kreiz 'tre diou rengenn.
O tonner ! ruillet an "agent de police" diwar e chipod-holen :
Halte là ! emezañ, ma kemerin ho numero ;
Eur goñtravañsion, hastit buan rei din hoh ano.
Ha petra c'hoaz, 'mon-me, sonet eo ar hreisteiz, serret ar buroiou.
N'emañ ket an eur ken d'ober koñtravañsionou !
Me 'zo poent din hastañ, me 'zo o vond da Dregastell
Pa 'h on pedet da vond d'am lein da di ma dimezell.
Petra ? poent dit hastañ ? emezañ, imbisil !
Da betara neuze out deut en otomobil !
Eun oto 'zo mad d'ar re o-deus amzer forz pegeid ;
Med pa vez poent hastañ eo welloh mond war an treid,
Pe da vihannañ en bisiklet war an trotouerou
Ha tapoud 'nezi war e skoaz da vond dre vesk ar gweturiou !
Me 'rofe eun taol-dorn dit, 'mon-me, "*agent de police*"
Daoust hag-eñ 'z-tefe c'hoant da zegas en Lannuon ar hiz
Da dud ar vro da vond dre ar ruzelennou gand o gweturiou ?
Bremañ 'vez greet ar "*pont*" deuz ar zul d'ar meurz ;
'Hnata ! lerit d'ar baotred vraz deuz ma ferz⁵¹.

⁴⁹ buon-ha-buon : buan-ha-buan (evid ar rim).

⁵⁰ ma chek : ma chekenn.

Ober ive eur pont deuz Beg-ar-Lann betek Sant-Rok
Ma 'h ay an oll dud buannoh war a-raog !
Ya ! hardi, heñchou nevez a-dreuz hag a-hed ;
'Vel-se 'vo êzetoh da bep hini mond d'ober tro ar bed,
Rag an dud a blij de' hardi karzañ, redeg, nijal ;
Dalv ket ar boan lared n'eo ken ar vuhez evel gwechall.
Souden, 'vid treuzi kêr, 'vo eur laissez-passer, eur *pase-parutout*,
Ha n'efer ken da Lannuon nemed war *rendez-vous* !
An eur 'vo lakeet deoh d'arruoud gand ho yer hag ho lapined
Hag an eur da vond d'ar gêr, pe 'vont gwerzet pe ne vont ket.
Ya ! e Lannuon e vo kont evel-se,
Ha da unneg eur hanter 'vo sonet ar hresiteiz !

⁵¹ ma ferz : bet skrivet "ma feurz" evid rima gand "meurz".

Ar masoner

1

War an douar-mañ, an treou a zo ingalet mad ;
Tud a bep seurt micher a zo warnañ o labourad.
Koulskoude ar bed ne vije ket ken êzet ha ken kaer
Paneverd d'an treou a zo savet warnañ gand ar masoner.
Se 'zo kaoz : kement den e-neus eun tamm kalon
A dle paeañ eur chopinad da baotr e loa-vason.

2

Goud a rit oll e plij din eur bannah treou⁵²
Med hini 'bed ouzoh 'n-eus gwelet ahanon mezo.
Adaleg ar lun ar beure dindan n'eus forz petore amzer
Me 'vez o sevel mein hag o stekañ pri gand ar voger.
Hag an hini a gemero 'hanon evid eur lonker boeson,
Me stouvo dezañ e henou gand ma loa-vason.

3

Pa 'h an da redeg 'ven ket kemeret 'vid eun aotrou
Rag aliez e vez louz ha fall ma zammou truillou ;
Med avad ne ven ket ive kemeret evid eur laer
Rag ar jañdarmed a oar a-walh eh on eur masoner
Ha ne gasfont 'hanon biken d'ar prizon
Keid ma vo 'barz ma dorn eur loa-vason.

4

Ar labourer-douar a vez o hadañ hag eostañ,
Ha ma 'meum bara da zebri e kleom lared trugarez dezañ.
Koulskoude ar bara-ze 'vije ket poahet gand ar fornier
Paneverd zo savet eur forn gand ar masoner.
Nann, biskoaz den 'n-eus greet kaerroh iñvañsion
'Vid an hini 'n-eus iñvañtet ar loa-vason.

5

Pa vez eur gouel pe eur pardon en Breiz-Izel,
E vez c'hoant d'ober krapouez gwiniz pe gwastell ;
Med ne vije ket a vleud d'ober gand ar miliner
Paneverd zo savet eur vilin gand ar masoner.
Hag ez oh souezet o weled an ton hag ar pardon,
Hag ar gaoz wellañ gand paotr e loa-vason !

6

Piou 'n-eus savet e di bihan d'ar paour, e di braz d'ar pinvidig ?

⁵² treou : "treo" e tregerieg.

Eur palez en Pariz da Brezidant ar Republik ?
Ma 'n-eus ar Jeneral De Gaulle eur hastell ken kaer,
E tle lared bennoz Doue d'ar masoner.
Se 'zo kaoz pa oa bet o weled ar Radom en Lannuon,
E-nevoa saludet evel-se paotr e loa-vason.

7

Ya, me 'm-eus savet tiez da galz a dud
Ha din ma-unan 'm-eus ket gallet sevel eun tamm klud.
Nann, rag aliez 'vez ket druz jeu ar masoner ;
Warlene 'vid bezañ savet eun ti nevez d'an Aotrou Mêr
Hag eur presbitoar d'an Aotrou Person,
E oa laret din mond d'ober eur gest gand ma loa-vason.

8

Laret 'vez bezañ paour gand eur vicher seurt 'm-eus desket
Ha gand eun iñstrumant seurt 'm-eus prenet.
Ya ! kaer 'mo poanial 'vin biken milioner
Med mar gallan e talhin ma reñk a vasoner.
Ha ne glevfet ket lared e-mo lonket ma bouchon
Na greet "*faillite*", goar ma loa-vason.

9

Ha n'eus forz pegoulz e torrinn ma horn-butun
Ha posubl 'mefe greet ma fortun,
Me vo galvet d'ar Baradoz gand ma Zalver :
Deus, emezañ, e oan just o hortoz eur masoner,
Rag amañ zo ezomm da hadchekad ar pignon ;
Te a raio se gand da loa-vason.

10

Ya, ma Doue, 'n eur gontañ rimadellou war an douar e brezoneg
'Vel ma reen war an douar er veilladeg
Ken ma laro ar zent : 'm-eus aon, emeze, ar masoner
A zo eur gaouiad hag eur blager.
Med eur pabor eo paotr Berlewane ha penaoz 'ra e gont
D'ober ken brao labour gand e loa-vason.

Ar morad braz

Ton : Ar Blerimer

Er bloaz seiz ha tri-ugent, soñ o-devo an dud
'Vid degas tud d'ar vro-mañ e oa greet kalz a vrud.
En miz Meurz e oa laret 'vije eur mare braz :
Eur morad 'hlee bezañ seurt 'oa gwelet biskoaz.

Skrivet 'oa hag embannet, kaset dre-oll ar gaoz
'Oa 'r mor o vond da zouzañ hanter-hent da Vro-Zaoz.
Kredet 'devoa tud ar vro hag ive tud Pariz
E vije dizoloet zoken ar gêr a Iz.

Tud 'zo deut a-vilierou hed-ha-hed aochou Breiz ;
An ormel a displego, tapet e vo e-leiz.
An eil 'tre treid egile, stankoh evid merien,
Pep hini a dibabo 'tro nao pe deg dousenn.

Ha setu an douristed tapet dre besk-ebrel :
Ar mor n'e-neus ket treet, kenavo d'an ormel !
Rah morad braz ar hantved e-neus greet eun taol heg,
Tapet zo bet d'an hirrañ teir ormelenn 'tre deg.

Gwelet 'm-eus krak-aotrounez o tistrei deuz an aod,
Me 'lar deoh ar wirionez : 'oa ket ponner o lod ;
Med gand o itronezed o-deus bet kalz a boan :
Sahañ 'reent 'mesk ar herreg gand o zalonou moan.

An ormel en em zouche, an eil 'kichenn eben,
Etre treid eun douristenn o winkal en dour yen ;
Ha deuz aodeier Proz, honnez he-devo soñj,
Rag eun danfoeltrenn krank-saoz 'zo kroget en he foñs.

Diou ormelenn o selaou en-kichenn eur garreg
'Deus klevet eur ger nevez na oa ket brezoneg :
"C'est la marée du siècle ; ça ne se voit pas souvent !"
Med an ormel a zoñje : ar panerou 'vo skañv.

Med morad barz ar hantved 'n-eus c'hoariet e dro :
Bourdet 'n-eus an douristed kenkoulz ha tud ar vro.
Med 'vid koll eur vareaj 'reom ket a wad fall :
Kemerom kalz a gouraj, 'benn kant vloaz 'vo eun all !

Yann an oll ezommou

Warlene 'oan o klask
Warlene 'oan o klask ma far.
Kat 'm-eus 'nezañ, greet marhajou
Gand eun didalvez, eun digar,
Anvet Yann an oll ezommou.
En eur deul⁵³ e wele d'ar lun
E teu dustu da lared din :
Ezomm em-eus eun tamm butun
Da heul dillad fresk da wiskiñ⁵⁴.

Eur zigaretenn en e veg
Hag e zaouarn 'n e hodellou,
E chom da zelled ouz e wreg
O cheñch plouz dezañ 'n e votou.
Sehed e-nevez pa vez tomm.
Neuze 'h a war eur bannah treo'
'N e gafe 'lak kognak pe rom :
Setu a-benn noz e vez mezo.

'Ra ket eur hrogad war ar plên,
N'houll ket mond d'ar park pa ra glao,
Na mond a-benn d'an avel yen,
Med mond da bourmen pa vez brao.
Ha goude 'nevez poan 'n e benn
'N e jave pe e penn e hlin.
Ezomm da vond da dennañ dent
Pe da gaoud ar medisin.

An doktor 'lar dezañ neuze :
C'hwi 'zo skuiz, n'eo ket abaoe deh ;
Chomit teir zun en ho kwele
Ha diwallit da gemer beh ;
Ho kwreg 'raio deoh soubenn dru'
Ha da heul bannahou gwin mad
Pa devo⁵⁵ he yar, debrit an u,
Rag ezomm 'peus da 'n em greñvaad.

Ho skevent 'zo krog da darzañ.
Ezomm ho-pefe "*teinture d'iode*" /
Vad 'rafe deoh mond da heoliañ

⁵³ En eur deul : ? en eur zond 'mêz ; en eur daol ?

⁵⁴ da wiskiñ : evid rima gand din.

⁵⁵ devo : dozvo.

War ar bezin en kostez 'n aod ;
Diwallit deuz an avel zil.
Ezomm 'peus eur porpant tommoh
Hag ezomm eun otomobil
'Vid 'n em caharread êzetoh.

Ha me am-eus ezomm petra ?
Ma fezi 'vad ! soursi ha labour,
Derhen ar menaj en e zav
'N eur debri bara seh ha dour.
Pa laran kavet 'm-eus ma far ;
Ar hentañ gwellañ o foeltro.
N'on ket itron war an douar
Gand ma Yann an oll ezommou.

Ar wir Vreizadez

Ton : *An tour dantelezet.*

1

Elena bemdez a vez gwelet
O vêsa en eur ober stamm ;
C'hoant he-deus d'ober 'benn ar skouled⁵⁶
Eur mouchouar gloan tomm d'he mamm.
Ha pa dro 'n he fenn,
War veg an dosenn,
E sav da ganañ eun tamm kanaouenn ;
Kad 'ra berr an amzer,
En-krezi he farkeier. (*bis*)

2

Lard eo he saout koulz hag he deñved
Rag morse ne chom dibreder ;
En he zi an treou 'zo kempennet
Hag amann mad a oar ober.
'Barz an ofisou
Hag er pardonioù.
Kenkoulz evel pa 'h a d'ar marhajou
Gand he dillad Breizadez,
E vez eur farodez. (*bis*)

3

Eur hrak-aotrou a zo arruet
Hag a lar dezi, goapauz :
Da betra chom en-touez ho loened ?
Honnez 'zo eur vicher gazuz !
Heuillit 'ta ar hiz
Ha deut da Bariz ;
Anez 'vefet diskouezet gand ar biz.
Pell diouz an dañsou, heb mar,
Ne gavfet ket eur par. (*bis*)

4

Pell a zo, heb heuill hoh ebatou,
Am-eus kavet da zimezi ;
Ha bep sul, goude ar gousperou,
E ran eun dro gand Jañ-Mari.
Eur mestr-labourer,
Nerzuz ha seder,

⁵⁶ ar skouled : iskiz.

Ken dilu ha c'hwi, daoust ma'z oh euz kêr,
Hag a zo en e galon
Eur garantez wirion. *(bis)*

5

Gantañ me zavo eun tiegez
War vêziou Breiz, ma bro garet,
Leh eo êzet mired ar yhed.
Deuz on tamm labour,
Gand en em zikour,
E vevfom heb bezañ da seurt deoh dleour.
Hag e savfom mibien greñv,
Danvez 'vid an neñv. *(bis)*

E-barz ar havell

Ton : *Eur pont en Naoned.*

Aze e-barz ar havell, *digedon lañlira*
E zo kousket eun êl, *digedon lañlira*

E vamm gand joa 'n he halon
A gan dezañ eur zon.

Tamm ha tammig, emezi,
Te 'deuio da greski.

Te 'denno, evel da dad,
Lorh deuz bezañ Breizad.

Ha pan out en bord an aod
Eh i da vartolod.

Karoud a ri da labour,
Ne vi ket eun treitour.

Stourm a ri, mar deu brezel,
Evid bro da gavell.

Ha pa vo fall an amzer,
Me 'h aio d'ar Sklêrder

Da bedi 'barz ar chapel
Evidout, ma bugel.

Ha te 'gano war ar mor :
Salud, Steredednn-vor.

Ha nezue, ma vez⁵⁷ beuzet,
Da ene 'vo salvet.

⁵⁷ vez : ma vezez.

An daou êl

Ton : *Deiz ma hoñfirmasion.*

En Berlewane, devez ar goñfirmasion,
An Aotrou 'n Eskob a oe tenerraet e galon
Dirag eun daolenn nevez, kement he havas kaer,
Daou êl stouet d'adori o Mestr hag o Hrouer.

Kalon Jezuz 'oa lakaet war eun tron gwenn ha ru'
Hag o houlen e vennoz 'oa eun êl a bep tu,
War o fenn eur gurunenn, gwisket gand eur zae wenn,
Hag eur gordenn arhantet o stardañ o bandenn.

Digor 'oa o diouaskell evel p'o-dije c'hoant
Da nijal d'ar Baradoz pa oant dinamm ha koant ;
War menez ar levenez 'oant hanter-hent d'an neñv :
'Vid nijal di ahane n'eo ket red bezañ kreñv.

Unan euz an daou êlig a oa war e zaoulin,
Juntet gantañ e zaouarn dirag e Vestr divin,
E daoulagad o parañ 'vel stered lugernuz
War dremm leun a vadelez Kalon zakr a Jezuz.

Egile 'oa 'n e zav sonn dirag tron an Oan.
Gand e zorn mad o kinnig eur lilienn gwenn-kann
D'an hini, 'hed e vuhez, 'vo e wellañ mignon
Hag e zorn kleiz 'oa gantañ war boullig e galon.

On Eskob pa o gwelas 'oe barr e levenez ;
Rei 'reas de' e vennoz gand teneridigez ;
Goude, euz lein ar gador, e laras da gentañ
Pegement e oa plijet an daou êlig dezañ.

Hag ar Werhez venniget, rouanez an êle'
O gwele gand plijadur stouet dirag Doue ;
Ha, dindan he mantell hlaz, hi bremañ a viro
An daou vugelig dinamm beteg eur o maro.

Bloavez mad !...

Bloavez mad dit, ma BREIZ, ma hazetenn garet !
Gras dit da gad aliesoh a dor digor,
Da gad muioh a vrud ma vi gwelloh lennet,
Ma vi 'vid Argoadiz koulz ha 'vid tud Arvor,
Eun teñzor.

Bloavez mad d'ar re a gemer ouzit soursi,
Da rener, skrivagner, hag ive d'ar mouller,
Ma talhfont d'az sikour da zond beteg on zi
E-leh ma kavez bep sadorn eun degemer
Ken tener.

Bloavez mad da gement a gar ar brezoneg,
D'az madoberourien, d'az lennerien greduz ;
'Vite 'rin disadorn eur bedenn galoneg
Ma vo war beb unan skuillet dorn Jezuz
Grasou nerzuz.

Nedeleg laouen

Nedeleg laouen a hetan-me a-greiz-kalon,
Evid kement den a lenn "Echo Lannuon" ;
Digwener da noz, pa vo kanet : Nouel ! Nouel !
E houlenni bennoz ar Hrouadur santel.
Lared a rin dezañ lakaad eun dra bennag divarvel
En ho potez-koad ma lakit anezi er siminal.
Goude koan, evel pa oah yaouankig gwechall.

Lakaad a rin ive er horn bravañ deuz ma zi
Ar Mabig Jezuz, en-dro dezañ Jozef ha Mari ;
Ouspenn lakaad a rin ar bastored hag, evel en iliz,
'Uz d'ar hraouig e verkin : *Gloria in excelsis*.
Eno, war ma daoulin, dirag tiegez Nazared,
Ne ankouain ket tud Vreiz, ma bro garet.

Kontadenn Nedeleg

Pa oan bihan e oa laret din gand bugale all :
« Deiz noz Nedeleg lakaad ma botez-koad er siminal,
Hag e vije lakeet din e-bara gand “Le Père Noël”
Bobonigou ha marteze eur pezh pompinell. »
Med allaz ! Kavet ‘m-oa ma botez goullo war an oaled.
Abaoe er “Père Noël” ‘m-eus ket kredet,
Hag abaoe e rankan asanti emañ war an douar,
Rag en deiz all e oan lampet gantañ o vond d’an Nantouar.
Pedet e oan da vond da di “Kaner ar mor” e Louaneg,
Da zikour debri an diñdoñ deiz noz an Nedeleg.
Hag en eun dro gorn etre “Petit Camp” hag ar Mabiliez
Em-oa tapet eur lamp, seurt ‘m-eus ket a hoant da gaoud aliez.
Eet e oan a-benn d’eun den, ken ‘m-oa gwaget ma rod a-raog
Hag eñ a oa ivez tanfoeltret en touflez gand ar chok.
Pa ‘m-oa gwelet anezañ, em-oa bet doan war an taol.
Ruz e zaoulagad, gwenn e varo, hag eñ gwisket drol,
Eur zahad treou war e chouk, eur hapuchon war e benn,
Eur pezh mantell ruz gantañ amarret gand eur gordenn.
Skignnal a ree e zent. « ‘Oan ket bet, emezañ, ruillet biskoaz.
Sav ‘hanon ‘n em zav, pe ‘h ez da gaoud eun taol baz. »
« Ho faot eo ma oh kouezet. Koz grogner koz,
O vond da beleh oh gand ar stal-ze pa eo noz ?
Perag bezañ gand eur skeul war ho skoaz, hag heb goulou ruz
Hag en tu-hont heb kaoud skiant da derhen ho tu ? »
« Abalamour, emezañ, ‘h on eun den brudet dre ar bed,
Me ‘m-eus droed da vond dre an tu ‘garin a-dreuz hag a-hed.
Me eo “Père Noël”. Ma zo eur skeul ganin, setu amañ evid petra :
Goud a rit a zo votadeg da vezañ evid ar bloaz.
Setu e profitan d’ober ma hampagn elektoral
Rag war ar reñk eh on evid bezañ koñseiller jeneral.
Ha gand ar skeul-mañ e tiskennin er siminaliou
Da lakaad treou d’ar vugale en o botoiou.
Hag ive da gement den ‘n-eus droed da voti,
Rag evid gonid moueziou eo red-maf regali.
Mond da weled an dud, prometi kaer,
Hag a-wechou, aliez memez, kontañ tammou gevier.
Me ‘gred da gentañ, e vin sur deuz mouez ar merhed.
Pa ‘mo lakeet ‘n o botez-koad eur sahad kakaouet,
Ha d’ar baotred, ‘vid harz aneze da goll o rêzon,
E lakin eun tamm butun, med kuit a voeson.
Setu kavet gand “Père Noël” eur stumm nevez da gabali,
E-leh paeañ boeson da baotred an ostaleri,
E lakefont ‘vel ar vugale o botez-koad er siminal,
Hag an hini ‘nevo c’hoant da vond da goñseiller jeneral

A ranko ober tro an tier gand ar skeul,
Hag e zupleant gand eur garrigellad vutun d'e heul.
Hag en-pad ma vo kousket an dud,
A-raog ma vo krog ar hog da ganañ war e glud,
Pe vo ramonet ar siminal pe ne vo ket,
Mond e-barz, ha diskenn dreizañ war an oaled
Da lakaad er botoiou eun dra bennag a bouez.
Peotramant an dud ne rofont ket o mouez.
Ha mar kar ar venajerien voti evid "Père Noël"
Ne rankfont ken nemed beb daou vloaz paeañ gourmikêl.
Savet 'vo c'hoaz uzinou nevez e-tal Lannuon en Kerzolez
Leh 'vo greet pep seurt treou, da gentañ gand ar patatez.
Hervez klevet gand ar feluskenn⁵⁸ deuz pep patatezenn
'Vo greet eur feullenn wenn d'ober eur zigaretenn.
Ober a raio ive gwestou⁵⁹ kartoñs gand pillou
Da lakaad en koñserv freuz ha legumaj ar Vretoned.
Ya. Red eo asanti "Père Noël" 'zo eun den "calé"
Ma kavfom eur handida e tu-hont dezañ
E vo poent dim voti evitañ.

⁵⁸ ar feluskenn : peillusk.

⁵⁹ gwestou : boestou.

Bleun a zo en avalou

Ton : *War bont an Naoned.*

An trevad a vo dister, *digedon lañ lira,*
Treud eo bet an amzer, *digedon lañ lira.*

Med da vihanna⁶⁰, jistr a vo ;
Bleun 'zo en avalou⁶⁰.

Gwellañ tra 'zo d'ar Breizad
Eo eur banne jistr mad.

Na pa ve poah e skevent,
Pe faout krogenn e benn,

Leh mervel e pareo,
Ma ev dour avalou.

Noz-deiz 'hallo labourad.
Gand ma 'h evo jistr mad.

Lared 'ray ar medisin :
Evit jistr, kuit a win.

M'o-dije bet er stourmad
On zoudarded jistr mad,

'Vijent deut a gorr-roched
Da rei koad d'ar Voched.

Greet o-dije de' skampañ
Buannoh 'vid bremañ...

M'ho ped d'en em laouennaad,
Rag da vloaz 'vo jistr mad.

Skarzit ho parrikennou ;
Bleun 'zo en avalou.

⁶⁰ Bleun 'zo en avalou : ikskz. Bleun zo er gwez-avalou.

A hoñje paeet

Ton : *Silvestrig*, pe *Me a laka ma fiziañs*.

P'oa deut ar hoñje paeet,
Viktor ha Mari-Louiz
O-doa kenkent goulennet
Penzeg devez diskuiz ;
Koulz eo dim heuill ar lezenn
Ha senti ouz ar stur ;
E-leh ober pinijenn,
Kemer on flijadur.

Hag int d'ober eur bale
Gand eur weture-dre-dan.
Homañ 'ruillas hebdale,
Ha lahañ 'ne dindan.
Ha setu an daou bried
Eet dirag o Barner ;
Ar levr braz 'oe digoret
Dirake gand Sant Per.

War an douar, emezañ,
Nan eus den heb e si ;
C'hwi ho-poa daou, war 'welan,
Ho kwreg he-devoa tri.
Red 'vo deoh mond asamblez
'Vid se d'ar Purgator :
Mari-Louiz 'deus eur bloavez
Ha c'hweh miz 'n-eus Viktor.

Hemañ 'respontas da Ber :
Ar gont-se n'eo ket brao !
Me 'zo triweh miz d'ober,
E refom beb a nao.
N'houllan ket bezañ 'n eur leh,
Ma gwreg en eur leh all,
Rag ne gouskfen ket dineh,
Aon 'h afe gand eun all.

Setu aze, priejou,
Lezenn ar garante' ;
Paeañ dle ho pehedou
An eil 'vid egile ;
Daouhanteri ar zoubenn
Ha chom da 'n em hortoz

'Vid mond kichenn-ha-kichenn
Eun deiz d'ar Baradoz.

Dui ar gwenn

Ton : *Kantik Santez Anna.*

Eur gwiskamant, eur zae wenn
A vez duet êzet.
Med goude n'hallez biken
Gwennañ an dra duet.

Hag evel ma vez livet
Eun dra sklêr en teñval,
Evel-se d'eun den meulet
E haller rei brud fall.

Dond 'ray teodou binimuz,
Da glask rei da gredi
E vo an den mad kabluz,
Hag int a vo disi.

N'oh-eus ket, emeze, klevet
Ar gaoz 'zo o redeg ?
An oll 'gomz euz an torfed
'N-eus greet ma amezeg.

Gelloud a rit ma hredi,
'Laront a henou frank,
Ma n'on ket oh iñvañti ;
Klevet 'm-eus war ar stank.

O ! me, a laro honnez,
Pell 'zo 'm-oa gouvezet
'Oa ket digailhar hennez ;
Med tevel am-oa greet.

Nezue, eme ar re all,
Kasom ar gaoz en-dro ;
N'eo ket pehed e damall,
Mard eo gwir pell a zo.

Evel-se 'vez tamallet
Meur a hini en faoz :
Ha darn e-leh dislavared
A glask astenn ar gaoz.

An neb a lar da gentañ
A lar 'n-defe klevet ;

An teodou 'ra eveltañ,
Hag ar gaou 'vez brudet.

Êzet 'vez koll an enor,
Diêz hen adkaved,
Rag mond a ra beteg ar mor
An droug a vez laret.

N'it ket eta da zispenn
E vrud vad d'an nesañ ;
Pa vo duet e chupenn,
N'hallfet ket he gwennañ.

Ar vinorez

Maro he zad, maro he mamm,
N'he-devoa bet na breur na c'hoar.
Ar vinorez c'hoaz yaouank-flamm
'Oa heh-unan war an douar.
Ma flanedenn a zo kaled !
Den ne garje bezañ 'veldon ;
Nan eus den, 'mezi, da gared ;
Den ive ne gar ahanon !

E-pad ma oa oh hirvoudi,
Eun den yaouank a galon vad
A dremenas 'kichenn he zi.
Pa he hlevas, eñ da dostaad :
Ma flanedenn a zo kaled
Koulz hag hoh hini, a laras.
Ma mamm p'he-devoa ma ganet,
En kostez 'n hent ma dilezas.

Ha pa n'am-eus na kar na par,
'H on o klask eur plah yaouank fur
Da lodenni war an douar
Ma anken ha ma flijadur.
Neuze, e respontas homañ,
'Room 'ta an eil d'egile
'N eur chom da vevañ en ti-mañ
Karantez evid karante' !

Teir zun goude 'oa an eured :
Ar hloh a vralle 'barz an tour
Hag al lapous d'an daou bried
A richane war veg ar skourr.
En ti-ze, Doue 'vo meulet,
Dre m'e-neus greet 'n E vadelez
'Vid unani ar vinored
Sakramant ar briedelez.

An diou vinorez

Diviz 1

Maria, gwisket en gwir Vretonez, a zo azezet war eur garreg o kempenn eur groaz gret gand bleuniou ha glazur.

A ! ma Doue, daoust hag-eñ em-mo an evurusted
Da weled hirie ma hoar vihan muiañ-garet.
Nim 'zo diou vinorez chomet war an douar heb den,
Hag eh om savet pell-pell an eil diouz eben.
Ganet om bet war ar mêz er penn all d'ar Frañs,
Hag abred e oa kouezet warnom an drougchañs.
Me a oa o teski kerzed ha ma hoar 'oa 'n he havell
Pa oa skoet ken didruez on bro gand ar brezel.
Ha kerkent ar zoudard kaloneg ma oa on zad
A rankas on dilezel, an daerou 'n e zaoulagad
Evid mond prim da diarbenn an enebourien.
Hag en deiz war-lerh e chomas war an dachenn.
E ene a oa nijet evel eur goulm daved e grouer
Evid resev eur bod palmez hag eur gurunenn a verjer.
Hag er memez amzer e saillas warnom an Almanted.
Hag on bro-Nord a oa kazi oll dismantret.
Lazañ a reent ar vugale, ar zoudarded fallagr !
On mamm evel kalz re all a hallas kemer an teh.
Med a-bouez he dorn, ma hoar vihan war he breh.
Mez souden gand ar skuizder hag ar ranngalon
E oa brevet ha hirroh evid amañ n'halle ket dond.
Ha war ar rohell ma'h on azezet bremañ,
E pozas d'ober eun diskuiz, he diskuiz diwezañ.
Red 'oa dezi, pa oa bolontez an Aotrou Doue.
En-kreiz he yaouankiz, dilezel he bugale,
Ha mond d'an neñv war diouaskell heh Êl mad
Evid bezañ a-nevez unanet gand ma zad.
Neuze, nim a vanas da ouelañ gand an naon
En-kichenn on mamm baour nevez eet da anaon.
Med Doue 'n e vadelez ne dilezas ket ahanom,
Ha dre e hras, soudarded Frañs a arruas warnom,
Hag e teujont gand teneridigez d'on frealzi,
Hag en o zouez e oa daou zoudard deuz Breiz-Izel
On hemeras da bakañ tomm en o mantell
En eur lared : « Ne vefont ket dilezet ken ;
Mar kerez-te mired unan, me a viro eben ;
Pa distrofom eh efont ganim d'ar gêr. »
Mez ar zoudard a gemeras ma hoar da zevel
Ah eas 'gostez ar hreisteiz goude ar brezel.

Setu penaoz eh om savet unan en peb bro,
Ha n'om ket bet 'n em welet pell a zo.
Mez lakeet e-meum an eur da 'n em gaoud hirie
Evid kontañ an eil d'eben on zammig buhe'.

Diviz II

Anna a deu doustadig (homañ a zo en tok), heb gweled he c'hoar. Chom a ra a-zav en eun taol pa wel ar rohell hag e juntr he daouarn.

Anna

A ! ma Doue, daoust hag-eñ e vefes-te ar rohell
War behini⁶¹ e oa deut ma mamm da vervel ?

Maria

(O sevel).
O ! Anna, pell 'zo e oan o hortoz ahanout.

Anna

A ! ma hoar, te 'h eo, ne anavezen ket ahanout.
(N em vriata a reont o lared o-diou war eun dro) :
A ! pegen dous eo da diou hoar 'n em weled
Goude bezañ bet keid amzer dispartiet !

Maria

Gweled a ran eh out yah, mz ive eh out skuiz.
Azez amañ war ar garreg, hag e refom eun diviz.

Anna

(Oh azezañ).
Ya, rag hast am-eus da gleved deuz da gelo',
Mez da gentañ, lavar din perag eh out ken faro,
Ha peleh e-teus kavet eun heveleb gwiskamant.
Biskoaz n'em-oa gwelet ken deread na ken koant.

Maria

Ar gwiskamant-mañ am-eus kavet en bro-Dreger.
Du-mañ, paour ha pinvidig a vez gwisket kaer.
Heb ober koulskoude kalz a dispignou,
Rag ar hoof hag ar mouchouar a bad bloaveziou.
Bremañ, lavar din ive penaoz e-teus greet
Da deski en Bro-Hall yez ar Vretoned ?

Anna

⁶¹ behini : war an hini.

Te 'oar, ar zoudard hag a nevoa bet ar galon
D'am hemer da zevel, a oa eur gwir Vreton.
Ha daoust dezañ da vezañ kuitaet bro e daou-koz,
Em-eus klevet anezañ aliez o lavared penaoz
N'hall ket eur hristen mougañ en e greiz
Ar zoñj nag ar garantez evid e vro-Vreiz.
Ne veze ket klevet nemeur o komz galleg,
Ha gantañ em-eus desket komz mad brezoneg.
Mez bremañ, ma hoar, lavar din c'hoaz,
Da lakaad peleh eh out oh ober eur groaz ?

Maria

Da lakaad amañ en he sav en-kichenn ar rohell,
E leh ma oa deut on mamm gêz da vervel.
Te a oa bihan-bihan, mez me am-eus soñj eun tamm
Deuz huanadenn ha komzou diwezañ on mamm.
Ober a reas sin ar groaz ha juntañ he daouarn
En eur lared din doustadig en em skouarn :
« Ma bugel, ma chomez beo, deus amañ pa vi braz,
Hag en soñj ahanon e savi amañ eur groaz. »
Red eo din ober anezi gand glazur ha bokedo'
Kutuillet ganin en lanneier ma bro.
C'hoant em-oa d'ober unan en mein benerez koant,
Mez allaz n'em-oa ket a-walh a arhant.
Te avad, diouz da weled, a zo pinvidig-mor,
Marteze du-hont e-teus kavet ha miret eun teñzor.

Anna

An teñzor am-eus kavet ha miret eo ar furnez,
Mez a-hend-all em-eus nebeud-kaer a binvidigez.
Koulskoude eh an d'an 'n em lakaad d'az sikour,
Rag c'hoant am-eus e vefe kaer ar pezh labour.
Da gentañ, greom eur Hrist da lakaad er groaz,
Pe, gortoz, me 'oar petra a vefe kaeroh c'hoaz.
Eun dra bennnag a zo ganin amañ e-barz ar paper
Hag a degaso da zoñj deuz karantez or Zalver
Pa lakeas e gorr hag e wad, dre eur burzud,
Da dond da vezañ magadur an oll dud.
(Dispakañ a ra eur halir en paper alaouret, eun osti stag a-uz dezañ).

Maria

O ! Eun osti wenn hag eur halir alaouret,
Med penaoz ha peleh az-teus o havet ?

Anna

Me a laro dit mar teus c'hoant da gleved

En eur lakaad aneze en-kreiz ar groaz a-teus greet.
Du-hont e leh ma'h on o tremen ma yaouankiz,
Eh eo braz pep parrouz, pell etre peb iliz,
Hag ar beleg karget deuz on farrouz a oa koz.
Arru e oa eun troad dezañ war dreuzou ar Baradoz,
Ha daoust d'ar c'hoant e-nevoa da chom d'on hichenn,
Doue 'n-eus galvet anezañ da gemer e gurunenn.
Ar gristenien neuze a hortoze eur beleg yaouank,
Med allaz, dre du-mañ, hirie, n'int ket stank.
An iliz abaoe 'zo chomet goull ha yen.
Ar hleier 'barz an tour ne zonont ken.
Ne vez overenn na d'ar zul na d'ar pemde',
Neuze, me, evid 'n em dihaoui deuz ar holl-ze
Em-eus greet ma unan eur halir hag eun osti,
Ha dirag er horn souillañ deuz ma zi,
E taoulinan bep sul da goulz an overenn-bred
Evid lavared eur rozera war e hed
Da houlenñ gand fiziañs dre zikour ar Werhez
Ma welo on farrouz c'hoaz eun devez
Eur beleg o tond da lakaad he mab da diskenn
Deuz an neñv a-uz d'ar halir e-barz eun osti wenn.

Maria

O ! ma hoar ! Deus ganin da Vro-Vreiz.
Eno a zo ilizou kaer-kaer e-leiz.
Hag evel dre du-ze ne arruo biken,
Nann, en Breiz, ne vanko ket a veleien.
Hag en tu-hont c'hoaz Breiz he-deus evid patronez
An Itron Santez Anna da vaeronez.
Ya, na chomez ket e leh ma'h a ar feiz da goll,
Betegoud e teufe an dud eno da vezañ diroll.
Ha koulskoude eun torfet eo evidout,
Dilezel ar zoudard e-neus savet ahanout.

Anna

O ! Eñ eo e-neus ma dilezet da gentañ,
Rag eur miz 'zo e-neus kuitaet ar bed-mañ.
Me 'gred e-neus bet du-hont eun degemer mad,
Rag tremenet 'n-eus e vuhez oh ober ar vad.

Maria

Perag eo eo maro da vadoberour bremañ,
Ha n'out ket en du o tougen kañvou dezañ ?

Anna

Nann,, rag laret e-nevoa din, e-leh mond en du

Dougen kentoh dillad glaz-gwenn ha ru'
Evid an tri liou-ze e-nevoa karantez ha doujañs
Dre ma'h int liou banniel ar Frañs.
Evid divenn ar banniel-ze e stourmas er brezel.
Ha laret e-neus en deizioù all a-raog mervel :
« Lakit, emezañ, war ma bez e-leh bokedo' ;
Kroaz ma Zalver ha banniel ma bro. »
Ya, kollet am-eus eur lestad deuz ar gwellañ,
Ha bremañ n'ouzon ket peleh eh in da vevañ.

Maria

O ! deus da Vreiz. Honnez a zo eur vro dispar.
Eno e vez trevajou kaer e-leiz en douar.
N'eo ket bleunioù na freuz⁶² mad a vank,
Disheoliet e ver en hañv rag ar gwez a zo stank.
Pa ver o vesañ ar loened e krap ar c'hwibedou,
Pe o trei an douar e-barz an traoniennou,
E ver luskellet gand mouez ar lapoused,
Pe gand trouz ar mor braz pa vez dirollet.
'Barz an tourioù a-hed an deiz war bep ton
E vez klevet kleier sklintin o son.
War ar mêzioù en Arvor an êzenn a zo yahuz
Hag an neb a labour a vev eno evuruz.
Ya, deus ganin hag e hallfom on-diou
Bevañ er memez ti 'n em wiskañ er memez liou.

Anna

(O sevel).
A-walh e-teus laret ; eh an ganit hebdale
O houzoud⁶³ pegen madelezuz eo tud ar vro-ze.
Kanañ a rin gand anaoudegez vad en em hreiz.
Trugarez ha meulodi da zoudarded Vreiz.
Anez deze, nim on-diou a vije maro pell a zo,
Anez deze ive ne vije ket bet dasprenet on bro.

Maria

(O sevel).
Neuze bremañ, savom ar groaz war ar mên,
Hag a-raog kuitaad e stoufom diragi d'an daoulin.

(Sevel a reont ar groaz 'n he sav war ar rohell hag e taoulinont unan a bep tu dezi, juntet o daouarn, evid lared o-diou war eun dro) :

⁶² freuz : frouez.

⁶³ O houzoud : pa ouzon.

O ! Jezuz kuzet en osti roet d'on mamm ha d'on zad,
D'ar zoudarded o-deus skuillet evidom o gwad,
En ho rouantelez evel d'ar verzerien, an diskuiz,
Hag ar peuh d'ar Frañs, merh henañ an Iliz.

Ar mêsaer deñved

Ton : *Ho mamm.*

Bemdez ar mêsaer deñved,
Bemdez ar mêsaer,
En hañv, er goañv kaled,
En hañv, er goañv,
Evel gwechall santez Jann d'Ark (*bis*)
A weler ken fur 'n e bark,
A weler ken fur.

E zeñved bihan a gar,
E zeñved bihan,
Ha ma koll unan, heb mar,
Ha ma koll unan,
Kenkent evel ar pastor mad (*bis*)
E klasko hennez ervad.
E klasko hennez.

Hen kleved a reer a-bell,
Hen kleved a reer,
War skourr eur wezenn uhel,
War skourr eur wezenn
O c'hwitellad pe o kanañ (*bis*)
Evel ar goukoug en hañv
Evel ar goukoug

Klask a ra neiziou ive,
Klask a ra neiziou ;
C'hoari ha lammad 'ra goude,
C'hoari ha lammad ;
Evel-se dindan bolz an neñv (*bis*).
Ar mêsaer 'zo yah.

D'ar lanneg eh a ken skañv,
D'ar lanneg eh a,
Da guntuill bleuniou an hañv,
Da guntuill bleuniou ;
Brug ruz, balan, lann alaouret (*bis*)
D'ar Werhez, e Vamm garet,
D'ar Werhez, e Vamm.

Ar mêsaer a zant 'n greiz,
Ar mêsaer a zant
Eur c'hoant braz da chom 'n e Vreiz,

Eur c'hoant braz da chom ;
Pa vo brasoh da labourad (*bis*)
Douar Breiz-Izel ken mad,
Douar Breiz-Izel.

An hadañ patatez

Ton : *Le pommier enchanté*. Th. Botrel : *Chansons de chez nous*.

Krog eo ar voualh da ganañ (*diou wech*)
Hag ar bleuniou da zispakañ (*diou wech*)
Reuz a zo war ar labourerien
Lon diri dira !
Fouletad⁶⁴, lon le,
Dre ma'h astenn an de'

Emañ an oll dud war ar mêz
Bemdez oh hadañ patatez ;
Ar vamm 'zo er gêr o traillañ
Lon diri dire !
Ar vugale 'zo oh adañ
Lon dire dire !
Hag an tad, lon le,
'Zo o holo ane'.

Doue, p'eo braz E vadelez
A raio patatez 'n o fez
Diar an tammou a hader ;
Lon diri dire !
Ha neuze c'hoaz ar labourer,
Lon diri dire !
A dleo, lon le
E veuli adarre.

Gwechall en ti ar beorien gêz
E veze patatez ha lêz,
Hag en ti an dud pinvidig,
Lon diri dire !
E veze patatez ha kig.
Lon diri dire !
Aliez, lon le.
'Veze diou wech bemde'.

Ar patatez a zo bepred
Bevañs ha nerz ar Vretoned ;
Dre ze an oll dud war ar mêz,
Lon diri dire !
A had eun toullad patatez.
Lon diri dire !

⁶⁴ Fouletad : foula , mond buan-tre.

Evite, *lon le*.
Ha 'vid tud kêr ive.

Gwerz an dud didalvez

Ton anavezet.

Goude o fehed braz gwechall,
'Oe laret d'Adam ha d'Eva :
Brmañ 'honezfet ho para
Gand ar hwezenn dimeuz ho tal.

Lared 'reas Doue an Tad :
Ar labour aliez 'vo tenn ;
Med bezañ e vo eur bedenn
Pa hen grefet a galon vad.

Med kalz nan houllont ken senti
Hag a lar en amzer a ren :
Kalz re goz eo ar gourhemenn :
Labourad 'zo eur zotoni.

Penaos e padfe on spered
O chom da durial an douar ?
Honnez 'zo eur vicher digar ;
An treou a rank bezañ cheñchet.

Hga e-leh chom en-mesk ar fank,
Int eet da Bariz pe leh all ;
Brmañ 'laront : An treou 'h a fall,
Ha meur a draig dim a vank !

'Vid kaoud boued marhadmatoh
An aotrounez 'lar en kêr :
Kemer eur skourjez gand Fañch Kouër
D'ober dezañ hastañ muioh.

Eet o hokenn war an tu gin,
E laront oll en eur drinkañ :
Kat on-eus ar stumm en dro-mañ
Da zachañ dour d'on milin.

Bet o-deus o mennad dioustu :
Berraet eo o zunvez :
'Vo ket 'med daou-ugent eurvez.
Pegen mad eo an Talbenn Ru'

Heb ober erur hrogad labour,
E fell de' kaoud bara gwenn

Kaoud ive druz o zoubenn,
Hag evañ gwin, hini heb dour.

Med bravoh eo bezañ aotrou
‘Vid bezañ ‘vel ar paour-kêz Fañch,
Noz-deiz krog ‘n e bal pe ‘n e drañch,
Med d’ar re-ze ‘laro d’e dro :

Lakom Blum e-leh Tardieu,
Ha cheñchom ive a depute ;
Gand unan bennag ‘vo kerse,
Med ni a vo welloh on jeu !

Med ar paour-kêz tud didalve’
‘N em gavont ket gwall-êzet c’hoaz ;
“Grèves” ‘reont wasoh ‘vid biskoaz :
Daou-ugent eurvez ‘zo kalz re !

Med kaer ‘vo sevel ha diskar
Ar “ministère” hag an treou all,
Red ‘vo kenkoulz evel gwechall
Labourad ha trei an douar.

P’eo din ar labour hag ar boan,
Pa rankan hadañ hag eostañ,
Am-mo leiz ma hov da gentañ,
Ha c’hwil ho-po goude ma van !

Tour Berlewane sklêrijennet evid ar mision en 1936

Ton : *Salud deoh, iliz ma farrouz.*

Daoust petra a zo a-neve'
'Barz en iliz Berlewane ?
A houlenne war doull o dor
Tud ar vro, o genou digor.

Euz tro ar vro 'vije gwelet
An tour uhel sklêrijennet ;
Eun dudi 'oa selled outañ
Gand ar begou tredan ennañ.

Gwelet 'veze tud ar mêziou
O krapad war kein o hleuniou ;
Darn all 'h ee en beg eur wezenn
'Vid gweled an tour penn-da-benn.

Setu labour ar hlakennou :
Ar pab 'zo deut, 'me hiniennou ;
D'ober er barrouz-se hirie
Eur zant pe eur zantez neve'.

Me 'gredfe kentoh, 'me Fañchon,
Emañ ar goñfirmasion,
Ha dirag an Aotrou Serrand⁶⁵
'Ve c'hoant d'ober an treou "en grand".

Kentoh ez eus, eme Soaz koz,
Eun eured vraz da hanternoz.
Hag ar gouleier 'vid cheñch giz
'Zo lakaet er-mêz an iliz.

En dro-mañ, 'me Zann, me a gred
Eo arru tost da fin ar bed ;
Honnez a zo eur sklêrijenn
A-seurt ne welas biskoaz den.

Diwar ar bern-plouz e lar Liz
N'hall ket bezañ tour eun iliz ;
Diouz beg ar skeul e lar Katell :
Nann, hennez eo an Tour Eiffel.

⁶⁵ an Aotrou Serrand : eskob Sant-Brieg

Lakaad, 'me Job, a rit din dre fent ;
Hennez eo tour-tan Kerbrijant ;
Sklêrroh eo 'vid an Tour Eiffel
Ha n'emañket ahann gwall-bell.

Tavit ! an tour-ze, 'me Jakez,
Eh eo tour-tan ar Jentilez ;
C'hoant en-deus da sklêriañ fenz
Beteg park-mor ar Baradoz.

'Vel Sant Tomaz ive, Nouel
Ne gred nemed er pezh a wel ;
Mond 'ra war ziminal e di,
E lunedou war veg e fri.

Biskoaz, emezañ, kemend all !
Gweled a ran pa n'on ket dall.
'H eo hennez tour Berlewane :
Eun dra bennag a zo neve' !

Ar sklêrijenn 'zo burzuduz.
O ! sur, eun eil Mabig Jezuz
A zo ganet gand ar Werhez
War lein menez ar levenez.

Pa diskouel dim e steredenn
'Vel en dro all e steredenn,
Deredom 'vel an tri roue
D'adori ar bugel-Doue.

Evel da noz an Nedeleg,
An dud a dalh da zeredeg ;
Hag iliz dispar an Dreinded
En berr-amzer a zo karget.

Lared a ree tud Lannuon
Gand ar pevar gloh braz o son :
N'hallfom ket koulskoude kousked :
Koulz eo dim 'ta mond da weled.

Pa'h om ken tost amezeien
Ha breudeur evel kristenien,
Ni 'vo en o zouez arru mad,
Berlewaniz 'zo tud a stad.

Med petra 'oa war ar menez ?
Er mision a hiz nevez
'Vid ar merhed yaouank dreist-oll,
Med fenez e oa 'vid an oll.

Ha war don ar hrampouez-gwiniz
E oa pep tra 'barz an iliz ;
Kaer 'oa ar han hag ar muzik ;
Kaerroh c'hoaz mouez an Tad Kornig.

Neb a viro mad e gomzou
Ah aio eun deiz d'an neñvou.
Trugarez ha bennoz dezañ
Kenkoulz evel d'an Tad Konan.

Ar zoñj a chomo 'n on spered
Euz on zour kaer sklêrijennet !
Chom 'ray ive war on halon
Ar blaz mad euz ar Mision.

Ken brao 'oa danzeet pep tra,
Rag on Ferson n'espern netra.
'Vid ober vad ha plijadur
Ha 'vid ober ganim tud fur.

E miz c'hwevrer 1936.

An eur nevez

An aotrou

Petra ? Oh c'hoaz war ho labour ?
'Welit ket eo c'hweh eur en tour ?
Bremañ 'vo red achui 'n de'
Kentoh, p'eo krog an eur neve'.

Ar houër

N'eo eur goz hag eur neve'
An heol eo ma orolaj-me
Ha hennez ne cheñcho ket giz
War ali aotrounez Pariz.

An aotrou

An heol 'vez ken sellet outañ :
Re desket eo an dud bremañ ;
Son olrolaj 'vez selaouet,
Hag añjeluz koan 'zo sonet !

Ar houër

Teur eur goude an añjeluz,
An heol 'vo ket eet c'hoaz da guz ;
Nann, hennez n'ay ket buannoh,
Kaer ho-c'hwi koaniañ kentoh.

An aotrou

N'eus nemed kaoz an eur ganeoh ;
Serrit ho klank pa laran deoh !
Dleoud 'rajeh bezañ mezeg
D'ar houlz-mañ o heul ho kezeg !

Ar houër

Brasoh mez eo evidoh-c'hwi
Bezañ war an deiz o fumi,
Rag n'eus 'med an dud didalvez
O koaniañ ouz an eur nevez.

An aotrou

Ya, med ni gand an eur nevez'
A deul abretoh on gwele ;
Ha c'hwi a chom 'n ho kwele kloz
Da hortoz c'hweh eur d'an eur goz.

Ar houër

Me 'zav pa darz ar sklêrijenn

Ha beteg noz e talhan tenn ;
Med c'hwi 'hall kemer hoh amzer ;
N'eo ket ar pezh 'pezh d'ober !

An aotrou

M'emañ ar wirionez ganeoh,
N'onn ket petra a larin deoh ;
Med lared a rin trugarez
D'ar re 'deus greet an eur nevez.

Ar houër

Larit kentoh d'an dud a boan,
D'an dud 'vez diwezad o hoan,
Rag bevet oh gand ar re-ze,
Nann gand paotred an eur neve'.

Koukoug

Pa oan bihan, pa 'm-ije debret tapioka,
Me a dorre ma skudell hag a deule ma loa,
Ha pa vijen lakeet 'n em gwele, 'vijen ket pell
O pakañ ma fenn dindan an niñsel
Hag ober eun toull da vountañ ma lagad ;
Ha neuze pa gleven ma mamm pe ma zad,
Me 'zave ma fenn d'ober : *kouk... kouk...*
Hemañ, emeze, n'eo ket abil na droug,
Selaouit pegen brao e ra koukoug.

Dre forz debri tapioka 'oan deut da vezañ brasoh,
Med siwaz din tamm ebed furroh ;
Kaset e oan d'ar skol ha d'ar hatekiz,
Med me a ree troiou er hals koulz hag en iliz.
Pa lare ar skolaer din resitañ ma "leçon",
Pe pa lare ar hure din selaou e zarmon,
Me 'droe ma hein da ganañ : *kouk... kouk...*
A-wechou e tapen eun taol-baz war ma chouk,
Med wasoh a ze me a gane koukoug.

Eun dro bennag e oa kroget ar big 'n em skouarn,
Med me 'oa fin, finnoh evid eur louarn ;
E-leh mond da regali ar merhed d'an ostaleri,
Me 'h ee 'n eur wezenn da chakad kraou⁶⁶ pe da fumi ;
Ha pa welen o tremen eur plah yaouank,
Me 'haste buan tostaad da veg ar brank
Hag a 'n em lakee d'ober : *kouk... kouk....*
Sell 'ta, emezi, hemañ avad 'zo plouk,
Ne oar ket kanañ na lared nemed koukoug.

'Hanta ! Deut 'oan da vezañ brudet dre ar vro,
Rag tapet em-oa ar vrud 'benn fin an dro.
Pa 'mije greet eur serr-lagad d'ar merhed evel-henn
Da hastañ buan pakañ ma fenn.
Ha neuze zo bet deut n'ouzon ped dimezell
Da rei din eur pok 'dreg ma mouchouar-godell.
Neuze 'mije⁶⁷ muioh a nerz da ganañ : *kouk... kouk...*
Ken ma teue ar sukennou beteg terri o goug
Da weled hag-eñ e rajen deze koukoug.

Evel-se e oan 'n em gavet war ar bern da choaz ;

⁶⁶ kraou : kraoñ.

⁶⁷ 'mije : meze.

Ne ouvezen pehini da gemer ? pe Emili pe Frañsoaz ?
Mond a reen da gas aneze a beb eil d'ar gêr.
Setu-me da zoñjal tennañ plouz-berr,
Med biken ken ne rafen kemend-all
Rag aze avad em-oa greet eun afer fall
Hag abaoe 'ven ket klevet ken o kanañ : kouk... kouk...
Rag bet 'm-eus eur wreg hag a zo spontuz-droug
Ken 'ven 'pad an deiz o hopal warni : koz koukoug !

Tremenet int

En-kerz gouel an Ollzent er vered
E oa e-leiz hag a bep seurt bokedou ;
Pegen brao, pegen serz e oant da weled :
Krizañtem a beb liou er podou
 War ar beziou.

Ar bleuniou-ze koant ha dispar
A oa roet evel eur merk a garante'
D'ar re on-eus karet war an douar
Hag a zo eet bremañ o ene
 Gand Doue.

Med ar bokedou-ze daoust d'o haerder
A-greiz-oll eh int bet diskaret ;
Deut zo dizeblant eur barr-amzer
Hag hep truez na damant int bet torret
 Ha labezet.

Evel-se e vo kont ive gand an den ;
A-greiz-oll pa arruo e dro
E vo didroadet ha ne zavo ken ;
Kenkent 'raio mond d'e wir vro
 Ha lared kenavo.

Grev ar venajerien.

Klevet eh-eus en deiziou all komz 'michañs
Deuz ar reveulzi a zo bet e pevar gorn ar Frañs :
Evid eur wech, eet en grev ar venajerien !
Diskouellet gante e oant kap d'ober eur wintadenn.
Pa 'm-oa greet eun tamm krennañ da blouz ma botou,
Gwisket ma forpant ha cheñchet tu d'am bragou,
Me a-gavelleg war ma zrakteur, eun taol manivell
Teuf ! teuf ! teuf ! eur lamp glesker, war ar skabell.
Ha dio da Lannuon da lared da baotr ar "Sous-Préfecture" :
« Ma rit ket welloh 'vid-se, me gemero ar stur.
Me 'gred 'peus c'hoant en dro-mañ da lakaad ar venajerien
Da rankoud mond da gaoh-kezekañ gand eur gordenn.
N'oh ket kap, gand gwerz eur hant patatez,
Da gaoud daou bakad butun hag eur voestad alumetez.
Tri-hant lur ? Med n'eo ket gwerz diou voutaillad win !
Red eo lared 'vefe eet ho kokenn war an tu gin !
N'ouzoh ket pegement e koust eur zahad gouano ? »
« Med, med, eme ar "sous-préfet" ; 'n eur lakaad e lunedo',
N'eo ket red kaoud gouano evid hadañ patatez. »
« A ! nann ? Penaoz e rajeh ma vijeh war ar mêz ? »
« "C'est-à-dire... heu... heu... ». « Arsa ! 'mon-me, esplikit din e brezoneg.
Peogwir e welan n'oh ket kap da disvalañ galleg. »
« "Eh bien... Eh bien..." da lared eo "dans la terre" ober "des" toull
Ha jiklañ e-barz " ... de la chie-poule ! »
« Deut eo ganah avad, "chie-poule" me 'gred a zo "kaoh-yer".
Daoust hag-eñ ne vefe ket er "sous-préfecture" heb bezañ re ger ? »
Setu desket din gand brasañ aotrou 'zo e Lannuon
Hadañ patatez digoust ha buan-buan.
Da hortoz se, 'oa gwelet biskoaz a reuz.
Kaer a zo gwaskañ war an tu charre, 'h a an treou a-dreuz.
Kaer a zo hopal « ouichedrou »
N'eus ket a voyen da derhen ar harr 'n e za.
Kaer a zo trohañ berr, sach war ar fiseleñ,
Lakaad dour er jistr hag astenn ar zoubenn,
N'eus ket a grog da skoulmañ an daou benn.
Ze 'zo kaoz kentañ hini a gomzo din euz ar "chie-poule"
Me a skiso warnañ ma hi Loull.
Ha pa rankan hadañ hag eostañ
Pa'h eo din ar labour hag ar boan,
E rin leiz ma hov da gentañ,
Ha c'hwi 'po goude, ma van.

Sehor

En deiz all 'oa Per o lared : « Pegen evuruz gand amzer ken brao ! »
-« Evurusoh 'vijem c'hoaz, 'me Baol, ma teuje eur bannah glao.
Na pa laran, me ne gouskan ket dineh
Pa welan du-mañ ar puñs arru seh. »
-« Serr da henou, Paol, na gomz ket din deuz glao,
Na pa ve seh da buñs, n'eo ket seh da gao.
Me bepred 'm-eus greet jistr leiz ma barrikennou
Ha gwin 'm-eus ive eun toullad boutailladou.
Deh 'oan bet en aod o 'n didanañ.
An douristed o fraoñval, ar lapoused o kanañ.
Tomm an heol bemdez, med ze 'h eo ar pez a vank.
Kuit da-eun da gargañ e votou, da galamarhad fank,
Soñj, n'em-eus ranket digeri ma disglaoier abaoe miz du.
Larom 'ta "Vive Monsieur le Maire et que la fête continue !" »
-« Ya, med me eo gand ma douar ha ma loened em-eus nehamant.
Se 'zo kaoz em-eus skrivet da benn braz ar gouarnmant.
C'hwi, 'mon-me, 'zo hir ho preh, hirroh evid ho mañch.
Ma 'pije gallet da vihanañ lakaad an amzer da cheñch
Rag en dro-mañ n'eo ket druz ar peuri ; ar melchon 'zo rostet ;
Ar zaout o vlejal, n'eo ket war o lêz, med gand ar zehed. »
_ « "Très bien, très bien", eme an aotrou Jiskar. "J'ai une solution". »
-« Hañ ! ya, 'vid lakaad glao d'ober "appuyer sur le bouton" ? »
-« Med nann, larit dah prenañ "chèvres et moutons", ha gwerza ho saout. »
-« Ha, 'vel-se, 'mon-me, e-po amann gevr ha kotelet maout. »
-« "Pas ça", med ar re-ze 'zo loened ha na evont ket a dour.
Ha "du coup", e vo ingal dah pegement a zehour.
Da hortoz eh an da dennañ an droejou diwar an alkol
Ha da divenn evañ dour, pa zo boeson o koll. »
-« Mad, 'mon-me, 'vel-se, 'vo adarre muioh c'hoaz a dud vezo.
Pa laran, Prezidant ar Republik a oar dresañ an treo'.
Med feiz, dre hras Doue, 'zo deut glao 'benn ar fin.
Setu 'vo gallet adarre lakaad dour er gwin.
Rag-se 'ta n'eom ket d'ober re a wad fall,
Peogwir pa vefom ket amañ, 'vefom e leh all.

Miz gouere 1977.

En daou venaj

En daou venaj on bet oh ober eun tamm tro,
Hag en hini kentañ ne 'm-eus kavet nemed liou ar maro.
Daoust ma richane ar lapoused war ar skourr,
Euz dalagad an tad e tivere an dour..
E oa e traou ar porz harpet war gleuñ an hent,
E gi Medor o yudal en e gichenn.
Diwar an torgos e houlennas digantañ ar goukoug :
« 'M-eus aon zo arruet en ho ti eun dra bennag a droug. »
« Ya, eme an den paour, ma mab a zo eet er-mêz ar vro.
Emañ o paouez lared din "ma zad, kenavo".
Evitañ koulskoude em-oa savet eun ti e gwasked an doseñ
Ha prenet an douar gwellañ a oa er gêriadenn.
Evitañ em-oa kemeret kalz a boan ha a reuz.
Da blantañ avalou hag a bep seurt freuz.
Ha bremañ eo eet kuit pa int gwenn gand ar bleun.
Daoust hag-eñ eun devez na 'nevo ket a geuñ ?
Da hortoz war ar stal eo red lakaad an taboulin,
Rag evidon en dro-mañ, pep tra a zo fin.
Med te, lapouisg, dalh da ganañ "koukoug"
Rag n'out ket kaoz d'ar zamm a zo war ma chouk. »

Beteg an ti neuze em-oa soñjet mond
Evid gweled ive penaoz e oa kont.
Allaz, ar vamm evel an tad a oa o ouelañ dru'
War an oaled, daoubleget a-uz d'ar ludu.
« Ma merh, emezi, a zanten eun tamm 'zo
U yennaad euz he herent, he labour hag he bro.
Ne gomze ken nemed galleg ha seblantoud 'ree kaoud mez
O heuill goueliou Breiz hag o kanañ en he yez.
Ha bremañ 'vel he breur eo eet da heul he fenn.
Ha pegoulz e tistroio da weled he herent ? »

Ahane 'oan eet d'eur menaj all eun tamm pelloh.
Eno avad, em-oa kavet an treou eun tamm joaüsoh.
War veg ar siminal e oa eur wennili
O soñjal diskenn e-barz gand eur begad pri
D'ober he nez 'vel ma reas warlene.
Med chom a reas da zaludi an daou bried neve'.
Ar wreg yaouank a oa o kas ar zaout d'ar liorz,
He faotr oh eouliañ e drakteur e-kreiz ar porz
'N eur ganañ "Labourer eh on, ha labourer e vin !
A ! ma hêriadenn, biken ne guitain.
Chom a rin er hontre e leh ma'h on savet.
Ha da drei an douar hag a zo distrempet

Gand ar hwezenn deuz tal ma zad ha ma zad-koz
Kant vloaz 'zo. Adaleg ar beure beteg an noz.
Evelte e karan hag e tennan lorh deuz ma micher
Rag n'eus ket eur vicher all ken red ha ken kaer.
Me 'zo o pourchas bara ar labour gaer. Ze 'zo war ma hont,
Gand se, kousto pe gousto, e talhin da vond.
Ya, daoust m'eo stard ar labour, ne zouzin ket a-dreñv,
Rag ma halon 'zo nerzuz ha ma diouvreh 'zo kreñv.
Eun diskuiz 'ran en iliz ar zeizved devez deuz ar zun,
Ha laouen 'ven adarre o kregi en alar d'ar lun.
Ya, en sioulder ar mêziou, 'm-eus kavet ar vuhe'
Hag ahane d'ar Baradoz e nijo eun devez ma ene
Evel ma nij ar wennili d'ar broiou pell
Ha ma horv a gousko en douar Breiz-Izel. »

An dornañ e Plouleh.

Biskoaz 'oa gwelet kemend-all a veh.
Tud e-leiz an hent abaoe 'r beure pe abaoe deh
O vond da weled pe da zikour da Blouleh,
Da Gerberon, da di Erwan ar Meur
E leh m'emañ ar vateur o tivogedi war ar leur.

Eur gouel disheñvel deuz ar gouelioù all
E ver o tornañ an eost en giz gwechall.
Ar yaouankiz 'devoa ket gwelet kemend-all.
N'ouzont ket petore poan a vije d'ar houlz-se
En-pad diou zunvez pe deir war ar leur bemde'.

Ar Vretoned 'zo bet hag a zo labourerien
Hag evite ar labour a zo eur bedenn.
Med hirie e labouront gand eun tamm fent
O vezañ ma eo 'r zul e vo eun tamm cholori.
Klevet 'vo e-leiz kanadeg ha soniri.

Pa vo toget ar bern plouz, ar wastell 'vo sonet.
Gand skubelennou bezo ar leur a vo skubet.
Ha war an dornerez, bleuniou a vo lakeet.
Hag a-raog ma'h aio an heol da guz,
A-bouez-penn 'vo kanet an añjelus.

Ma gourhemennou a ginnigan a-raog achui
Da Erwan ar Meur, d'e bried, d'o bugale o-zri.
Hag eur pok d'ar chouchouenn vihan Nathalie.
Er bloaz a deu ar gouel 'vo demdost memez tra.
Neuze e laran d'an oll : « kenavo da vloaz. »

Er bloaz war-lerh, gand kezeg.

Ar hezeg eo ar loened ar muiañ karet ganin.
Ha gweled eun toullad hirie 'n-eus greet plijadur din.
Ya. Keid ma hallin kaozeal brezoneg
Me a gano meulodi d'ar hezeg.

Pegen brao gweled c'hweh a gezeg asamblez
O 'n em gleved da gas en-dro an dornerez.
Eun taol lagad seurt 'vez gwelet nemeur.
Meulodi d'o ferhenn ha da Erwan ar Meur.

Ya, labourer, ar hezeg a blij deze bezañ ganit.
Te a gar aneze hag int a zent ouzit.

Ha gweled loened ken mad ha talvouduz
O tanoaad en on bro a zo eun dra boniuz.

An azen ive a zo eur paour-kêz loen mud.
« 'Vez sellet ouzin, emezañ, gand kalz a dud
O vezañ 'michañs ma'h on lorgeneg,
Ar vrud da vezañ berr ma spered ha penneg.

Koulskoude, ma karfe an dud soñjal
Petra 'm-eus greet evite gwechall,
War ma hein, 'm-eus kaset Salver ar bed
Euz Betleem d'an Ejipt, 'm-eus greet an hent war e hed.

Kaer zo lared 'm-eus eur penn kaled
Deuz Sant Jozef em-eus sentet
Ha gras din-me ar Mabig Jezuz hag ar Werhez
O-doa c'hoariet eun dro gamm da Herodez.

Ya, koulz ha forz petore paotr
O tornañ war ar leur, med 'zo ma lod.
Daoust ma n'on na braz na kreñv
Ne ven ket o stourm nag o sach a-dreñv.

Pa 'mez naon pe sehed, e labouran.
Ne choman ket d'ober hin-hañ.
Derhen a ran sioul ha didrouz.
N'an ket em gourvez e penn ar bern plouz.

N'ho-peus nemed goulenn digand Erwan ar Meur
Pa vez ar vateur gantañ war ar leur
E klask ahanon, beb bla⁶⁸
Da charread dour, d'ober forz petra.

Laret e vez : "Henez 'zo eet war gein e azen",
'Hanta marteze 'nefe ket greet eun taol dibenn.
Mond war gein an azen 'vez ket bep tro eun taol fall,
Rag me n'on ket sotoh 'vid eun all. »

⁶⁸ bla : bloaz (stumm Treger).

